

BARR HEOL war Feiz ha Breizh



Manifestadeg e miz Gouere e Tregastell : 800 a dud, war lerc'h maerioù ar vro a zo aet dirak kastell un den a felle dezhañ sevel war enez Renod un ti modern-tre. E-touez ar vanifestourien touristed ha breizhiz yaouank. Foto R.Laouenan.

Taolenn

1	Klerg : Ar Vretoned yaouank o timeziñ	3
2	A. Kalvez : Kembre 1971 (6)	6
3	Anjela Duval : Barzhonegoù War hent an Distro	9
	Marv va c'hi kozh	9
	Santad bugel	13
4	Ivona Galbrun : E Kastell-Gwion (Mezheven 1974)	10
5	Rimastelloù	12
6	E. Troal : Prezegenn (Gouel ar Brezhoneg)	14
7	Klerg : Anvioù-lec'h Bro-Blouvael (Pont-Terret - Brelouvach)	16
8	Soaz an Tieg : Keginerezh	17
9	R. Kermene : Botoù-lêr an Den marv	18
10	Klerg : Levrioù nevez	21
11	Ivona Galbrun : Korolloù Breizh	23
12	Keleier eus Kembre	27
13	J. Herri : Mabig bihan Roue Frañs (kontadenn-bobl)	28



Klerg

AR VRETONED YAOUANK O TIMEZIÑ

M'hoc'h eus c'hoent da zerc'hel disoursi ha dibruer gant ho labour, tudigoù kaezh, ez eus un dra hag a zo arabat deoc'h ober : sellout war ar c'hazetannoù roll an dimezioù hag an euredoù : rak sur oc'h da santout un dra bennak a-hed ho livenn-gain. Tud yaouank ar vro — me 'gomz eus ar vrezhonegerien, na petra 'ta — o timeziñ gant tud divrezhonek. Ne gortan ket eus kêrioù evel Lanvuron 'lec'h emañ ar pennadurezhioù goude bezañ digoret ar skluzioù d'an estrañjourien e-skud sevel labouradegoù — o vevzhañ douar Breizh d'an estrañjourien-se. Hag evel just, e vez dimezioù hag euredoù etre tud yaouank ar vro hag an dud yaouank bugale estrañjourien. Ur welenn-a-gastiz a-dra-sur evit ar yezh. Met n'eo ket hepken er c'hêrioù bras e c'hoarvez kement-se, met er parrezioù disterañ diver ar maez : evit en em rentiñ kont pegen don eo an droug, sellit, da skouer, ouzh ar c'hannedigoù-parrez !

Ur bed nevez a zo. Ar re yaouank a red ar bed e-pad an hafv hag e teu tud yaouank all eus ar broioù kreac'h da Vreizh ha setu tarzhet karantez etrezo ha priedelezh da heul, ha neuze tiegezhioù divreizhek ha divrezhonek. N'eus ket pell — betek ar brezel-mañ lakomp — na zimeze ket pe nebeut tud yaouank eus «Breizh Vrezhonek» gant tud yaouank eus «Breizh C'hallsouelo», zoken pa veze ar parrezioù stok-ha-stok a-hed bevnen ar yezh. Ne laka mui ar yezh a zispart etre ar re yaouank hag ar familhoù evel a-rak. . . Ha c'hoazh, evel just, e lezomp a-gostez, war dachenn ar Vreizh vrezhonek, ar c'hemmesk sebezus etre gallegarian ha brezhonegerien. . .

Ret eo evelto klask barn ur seurt degouezh ha gwelout hag-eh ez eus tu da bellaat an droug-se, rak a-benn ar fin, mar ne sellomp ket se evel un droug evit hor sevenadur ez eo koulz arzav n'emaomp ket mui war dachenn ar stourm, met ez omp deuet da vezañ tud lez-da-vont.

E-keñver teologiezh, e seblant sklaer ar respont : an holl dud a zo par an eil d'egile, an eil den a dalvez egile, pa'z eo den evel egile. Trouz a-walc'h a zo an askont d'an apherthad, d'an dispari-dre-lezenn etre reoù wenn kreistaiz Afrika hag ar reoù du. N'eus netra o tifenn.

hervez al lezenn naturel, na driest-holl hervez lezenn Doue, ouzh tud ur ouenn bennak pe ur bobl bennak da zimeziñ gant tud eus ur ouenn pe ur bobl bennak all. Da heul prizonidi-vrezel e oa deuet, e 1945, poloniadezed pe zoken alamantezed ; eus Indô-Sina ez eus deuet anamitezed da heul ar soudarded bet a-hont o vrezel. Eus Aljeria avat, n'eus ket deuet marc'hed da heul ar re bet a-hont o vrezelaat ; an askont d'ar relijion ha da stad ar marc'hed er broioù muzulmat hag e vir outo da skoulmañ priedelezh gant kristenien ; ar c'hontrol avat a zo bet gwir ; marc'hed kristen o timeziñ gant muzulmaned, Aljerianed pe Varokaned. Driest-holl goude ar brezel divrezhañ, pa zimeze Bretoned yaouank gant Aljerianed ; an aotra a vazo roet dezho gant ma prometje ar gwaz lezel badezh e vugale hag o sevel er relijion gatolik. Meur a vagoz avat, a zo bet kersê ganto, pa gant aet da heul o friedoù da vro-Aljeria : ur vuhez disheñvel-krenn diouzh an hini a anavezant a-rak, ha neuze ar vugale cheñchet arv dezho ha roet anvioù muzulmat ha savet e relijion Mohammed. Met kement-se a zo un afer all, deoust me'z eo un afer eus ar grevusañ.

E-keñver teologiezh, ne seblant ket e vefe netra o herzel an dud yaouank, n'eus forzh eus peseurt gouenn ha pobl eta, da zimeziñ asambles. Ari liz katolik koulskoude he deus bet savet lezennoù strizh da virout ouzh ar gatoliked da zimeziñ gant tud eus ar relijionoù all. Dre ma felle dezhi difenn feiz he bugale hag o skozallañ da sevel tiegezhioù katolik ; hag evel m'emaomp o paouez merkañ evit an dimezioù etre Aljerianed ha Bretoned, pa veze dimezioù etre katoliked ha protestanted, e veze ret kaout aotre ha prometñ sevel ar vugale er relijion gatolik. Met e oa bet d'en liz derc'hel kont eus ar c'hemmesk e broioù 'zo etre Katoliked ha Protestanted, ha pe ne oa tu ebet da zifenn groñs an dimezioù etrezo. Laoskaet eo bet al lezennoù-se abaoe ar Sened-Meur Vatikan II ; Merkomp evelkent gant pebezh diegi eo deuet an liz katolik da laoskaet he lezennoù war ar poent-se.

Kement-se a zo teologiezh ivez, rak tud stummet disheñvel, tud o welout an traoù pep

hini hervez n'eo bet savet ha kelennet, ez eo diaes dezho bevañ en un unanietzh strizh ha leal ha padus.

Amañ ec'h adkavomp lod eus kudenn an dimeziou etre Bretoned hag estrañjourien. E Pariz dreist-holl emañ ar Vretoned divroet, hag e Pariz en em gav tud divroet all eus rannvroioù all Bro-C'hall, evel ma leverer, hag e tichañs d'ar Vretoned dibab ur pried e-touez ar re-mañ. Kudennoù diaes a zo bet gweliet alies o sevel etrezo : pep hini anezho o klask mont da dremen e goñjeoù d'e vro c'hendik, ha neuze, da fin o buhez ivez. Meur a wech hon eus holl kevret Bretoned o tiskleriañ : «Allit ar re yaouank da glask o friedoù e-touez tud o bro ; re a ziaza-mantou am eus bet va-unan ha ne c'hellai nemet reiñ an all-se». Ha gant spredoù tud savet disheñvel e kreske an diaesterioù, na petra 'ta.

Hogen evel ma leverer c'lec'h ma vez staget ar c'havr e rank peuriñ pe grouviñ. Ha setu pezh o deus ranket ober kalz a friedoù dimezet ar stumm m'emaomp o piouser komz.

Met, siwvazh, bez' ez eus bet meur a wech torredimezioù etrezo. Met ret e vefe kaout sifroù ha statistikou resis-tre a-raok dougen barnedigezh war ar fedoù-se ; ha neuze bremañ e veler gwelenn an torredimeziou o kreskiñ zoken e-touez priedoù eus ar memes pobl, eus ar memes gouenn, eus ar memes paretz hag eus ar memes karter. Met daoust da se, o devez an dimezioù etre Bretoned, iskomp, muioc'h a chañs da harpañ.

O horjellañ war ha diaezzoù emañ ar gevredigezh, e Breizh — evel e kalz a lec'hioù all —, hu ken na vo adilakaet en he fiorn, e vo diaes adreñh d'ar Vretoned yaouank loc'h a-walc'h en o bro, en o sevenadur, en o yezh, evit ma n'o defe ken c'hoant da glask priedoù a-zivvaz d'o c'henvro-iz. A-benn ar fin, evel pep kudenn e Breizh, hon eus d'ober emañ gant ur gudenn vroadel : gwir groñs ar Vretoned da urzhiñ ha da ingaliñ o zraoù hervez o spered o-unan, ha da zifenn o yezh, o sevenadur hag o bro. Eno emañ an dalc'h !

Da c'hortoz evat, e c'heller kompren diaesterioù rummedoù Bretoned 'zo eus an Emsav, rak en Emsav ez eus koulz lavarout diou rummed tud, hervez o renk ar gevredigezh. Rummed ar re a reimp anezho bourc'hizien, da lavarout eo renkadou uhel ar gevredigezh : un toulbad noblañsoù, kerwerzhourien vras, tud eus ar nicherioù uhel evel medisinad, tud a-lezenn. Ha

neuze tud voutin an Emsav. Diaes-tre ez eo d'ar renkadou uhel donet er-maez eus o renkad, ha pa ne dint ket stank-stank, e rankont kaout darempredoù gant familhoù divrezhonek hag e wel tadou ha mammoù gant glac'har o bugale o dimeziñ gant gallegerien rik eus o renkad. Ken na vo niverus en Emsav — mar bezont ur wech bennak — tiegezhioù ar renkadou uhel n'eus ket nemeur a spi da welout kemm war ar poent-se : pa vo karantez etrezo, n'eo ket o c'hendennou broadel eo a viro ouzh ar baotred ha merc'hed yaouank da zimeziñ gant tud divrezhonek ha divrezhonek. Marteze o devozo esper da c'honit o friedoù d'o menozioù, met faziñ da vat a raint, daoust d'ar promesoù kaer a vo bet gret : bet ar paotr, bet ar plac'h c'hoantet he karer, keravo da filozofiezh ha barzhoniezh ! Ha d'ar promesoù !

Evit an tiegezhioù eus an eil renkad, n'eo ket ken gwazh ar gudenn, sur-mat, rak — da gontz en un doare amere a-walc'h — ez eus muioc'h a choaz. Nemet e ranko an tiegezhioù-se en em anavezout, en em zarempredañ, evit aesaat dimeziñ o bugale etrezo. Dre-se e c'heller meuliñ ar pezh a re tiegezhioù an Emsav. Rak evit bremañ, gwellañ harp ar yezh ez eo an tiegezh : ur wech kouezhet an Tiegezh breizhat ne vo mui nemet franctennataerien, evel ma lavare Meven Mordiern¹.

Menoziou sklaer avat a zielef bezañ e penn tud an tiegezhioù brogar. Setu emañ un arroudad diwar ul lizher gant ur brogarour yaouank : «Resevet em eus Barr-Heol ingal ha kalz a zudi em eus ouzh e lenn. Koulskoude n'on ket a-du ganeoc'h atav dreist-holl gant ar pezh a lavarit en ho pennadoù diwar-benn ar bilenn, an diskenn-bugale hag ar seksologiezh dre vras. An darn vrasañ eus ar vrezhonegerien yaouank a soñj eveldon 'm eus aon. Bremañ, c'hwil 'oar, ar re yaouank ne soñjont ket evel an dud en oad hag ar re gozh. Atav eo bet e-giz-se hag hiziv an deiz e vez gweshoc'h c'hoazh ar c'henn bras-se. Trist eo maruze, met evel-se emañ an traoù... Cherchamantou bras 'zo bet abaoe tregont vloaz hag ar vugale ganet goude ar brezel a zo bet savet hag o deus bevet en un doare all.» (27 a viz Genver 1974)

Setu emañ ur c'hloc'had all heñvel tennet eus *Al Liamm*, niv. 162, Genver-C'hwevrer 1974, goude diskleriadur Emglev an Tiegezhioù².

«N'on ket a-du evit rediañ (ar mammoù) da zougenn o c'hrouealled³, ma ne fell ket dezho : d'am meno ez eo pep den, paotr pe blac'h e ve, mestr war e gorf. Evidon-me ez eo ar gwir-mañ unan eus pennañ gwirioù Mab-Den : ken pouezus e kavan anezhañ zoken hag ar gwir a zielef kaout pep den da gontz e yezh-eh. Evit abegoù heñvel ivez, ne c'hellai ket kondaoniñ ar bomografiezh... Pep den en deus ar

gwir da lenn ar pezh a blij dezhañ, pegan lous bennak ha ma ve ! D'am soñj eta, ne zlefeomp ket ni, Brezhoned an Emsav a zo o stourm evit hor frankiz hag hor gwirioù bezañ a-enep an diforc'hañ-bugale hag ar bomografiezh.»

Evit pezh a sell ouzh kudennoù ar Seksologiezh, e c'hello lennerien *Barr-Heol* sellout ouzh niv. 76, Pesk 1973. Evit pezh a sell ouzh an diskenn-bugale (tro-lavar dereatoc'h eget diforc'hañ-bugale), e kav dimp en deus J.C. roet ar gwir respont o tiskouez n'emañ ket e gwirionez pep gwir gant an den d'ober ar pezh a gar gant e gorf, hag an deus ivez ar bugel ur wech krouet droed d'ar vuhez⁴.

A-zivvaz da bep filozofiezh ha da bep relijion, ez eus peadra da chom sabatuet gant tezennoù evel ar re a-us hag a c'hellomp diskeriañ e berr-gomzoù : «Bretoned yaouank, bevit gant ho prid war ho moue, heuilhit ho kwell-youloù, rak gant tud gwak ha gvan, gant merc'heterien ha voulevouioù e vo saveteet Breizh !» «C'hwil, tadou ha mammoù, diskennit ho Bretoned vihan, rak saul nebeutoc'h e vo a Vretoned vihan, muioc'h a-se a chañs he devo ho yezh da vevañ saveteet.»

NOTENNOU

- (1) Lenn *Imbourc'h*, niv. 53-54, Mezheven 1974, pennad gant Y. Olier, paj. 169 sq.
- (2) Gwelout *Barr-Heol*, niv. 78, Gwengolo 1973 paj. 41.
- (3) Ar *c'hrouealled*, en destenn. Met, d'hor meno, a-zivvaz d'ar skridoù teknikel ez eo gwelloc'h komz evel ma oar ar bobl ober, ha lavarout diwar-benn ur vamm : *emañ o tougen*, hep komz eus *krouealled*. Lavaret e vez, pa zic'hañs d'ur vamm *kaout un dispart*, he deus *kollet he bugel*. Dereatoc'h e vefe eta treiñ frazenn *Al Liamm* evel-hen : «N'emaomp ket a-du evit rediañ ar mammoù da zougenn (o) (bugel) betek ar penn, mar ne fell ket dezho». Ret eo bezañ war evezh, rak risklet e vefe da zeskiñ d'ar vrezhonegerien nevez troioù-lavar a rafe d'ar bobl hursuniñ.
- (4) *Al Liamm*, niv. 169, Meurzh-Ebrel 74, paj. 154.

kendalc'h ar bajenn 8.

Notenn : Aozet eo bet an droidigezh gant Klerg hag adkompennet diouzh alioù ab-Ennez ha John Roberts eus Pwllheli. Alc'houez ar varzhoneg n'eo ket diaes da gaout : ar barzh a labour evel ur wenañenn. Evit *neithdar* (8), e kinnig ab-Ennez : mel-bleu ff.

Gw. 19, emañ E. Bowen o c'hoari gant ar ger *owch* : ruskenn ha bag, setu perak en deus lakast *porthiadd* (porzh-mor) a-raok.

A. Kalvez

KEMBRE 1971 (6)

Dydd Iau⁽¹⁾ (12.8.71). — Fall-kenañ em eus heuliet ar brezegenn gentañ : ar c'hoant-kousket a oa warnon abaoe an deroù (al lein breizh-veurat !), distagadur ar prezegenner hag ivez, moarvat, an darvez re zianav din : *Agweddu* / *Farddoniaeth Heddiw* (Doareoù ar Varzhoniezh en deiz a hiziv). Komprenet em eus neozh e oa digor ar maread nevez.

Saunders Lewis (1893), katolik a zo sellet evel ur c'hatolik metodist, ha Gwenallt, anglikan (D. Gwenallt Jones, 1899-1968), eo an daou skrivagner o defe ar muiañ a levezon war o c'henvroiz en abeg d'o menozioù *radicalaidd* (dispac'hell).

Goude merenn ez on pignet betek ar C'hastell. Savet e oa bet e dibenn an trizekvet kantved gant ar Roue Saoz, Edouard Iañ, war ar roc'h, etre ar mor hag ar menezioù evit mestroniañ Kembre. Kant vloaz goude, e servijas e-pad pevar bloaz da gêrbenn ha da lez da Owain Glyndŵr. An toennoù hag ar pleñchodoù a zo kouezet, met ar mogerioù a chom sonn en o sav. Deñved a beur e peoc'h war an dosenn. Ar c'hastell a zo aloubet gant an douristed saoz, ha ne glever nemet o yezh a zo hiziv un dañjer evit buhez Kembre evel broad. Kejet em eus e diabarzh ar mogerioù gant pevar C'hembread. Unan anezhe en deus goulenet diganin : «En hoc'h-unan emaoch ? Emaoch o praderiañ war arouez gwaskerezh Bro-Saoz war Gembre ?»

OBEROU EUROS BOWEN

A-raok koan eo bet roet ar gentel-digeriñ war barzhonegoù Euros Bowen (1904-) en deus embannet pemp dastumad etre 1957-1970. Troet en deus kein d'ar varzhoniezh hengounel a zo anavezet gant ar selaouerien hag heuliet gant unan bennak anezho, evel Ann Griffiths, Ann o Llyn. Setu perak eo ret d'ar prezegenner, Dafydd Glyn Jones displegañ en-hir arouezelezh ar barzh *sagrafennaidd* (sakramantel) : an dra a vez gwelet o vezañ un arouez eus un dra all. Evit ar Brotestanted, da skouer, ez eo ar bara hag ar gwir, e Sakramant an Aoter, ur skeudenn eus bezañ ar C'hrist. Evit ar Gatoliked avat, n'eus mui na bara, na gwir, met Korf ha Gwed ar C'hrist. Seurt barzhonegoù a zo diaes evit lod eus ar bobl, met ur vro a zle kaout barzhoniezh

war liveoù disheñvel, adalek kanaouennoù Dafydd Iwan, a vez komprenet gant an holl, hag oberoù Euros.

Ouzh taol e oan gant koan, e-mesk saoznegerien. Ur saoznegerezh he deus va goulennoù diwar-benn Kembre hag ar C'henvarc'had. Responder em eus e vefe ret da Vro-Gembre difañ hec'h interest, pe e kavfe etrezi ha renerzh ar C'henvarc'had, gouarnamant Londrez, evel m'emañ Pariz ur skoilh war hent Breizh ! Pezh a zo gwir, emezi, evit Pariz n'eo ket gwir evit Londrez hag a ra kement evit Kembre. Ar Saoz a zo a-dal din n'emañ ket a-du ganti. Mar fell da Vro-Saoz saveteiñ Kembre e vo ret reiñ da Gembre ar gailoud d'hen ober !

«Emaon o koll a c'hembraeg !», emezon. «O !», eme eben, «Keit ha ma komzot saozneg, ne gollot ket amzer. Ur yezh talvoudus eo !»

EUROS BOWEN

Gwener 13.8.71 : - An Dr. Glyn Jones, arc'heskob kozh Bro-Gembre, a c'houlenn en ur pennad war ar *Western Mail*, na heulio ket *Cymdeithas yr Iaith* hent an drouknerzh a c'hellfe degas dizunvaniezh ha kasoni er vro, evel m'en deus graet nevez 'zo en hanternoz Iwerzhon : 21 a dud lazhet en devezhioù diwezhañ. Anzav a ra koulskoude ez eus a-walc'h a skouerioù er c'hard-kantved diwezhañ da ziskouez «e pae an drouknerzh» ! Aze emañ an dalc'h. Peseurt drouknerzh a c'heller implijout ha betek pelec'h mont, rak an drouknerzh a vez implijet pell 'zo enep ar pobloù gwasket.

Hiziv e lenn Euros Bowen barzhonegoù tennet eus *Cylch a Gerdol* (Kalc'hiad Kanoù, 1957) hag *Achlysuron* (Degouezhioù, 1970⁽¹⁾). Siwazh, n'em eus etre va daouarn nemet *Achlysuron* ha ne gomprenan ket kalz a dra pa ne vez ket an destenn etre va daouarn. Met kompren a ran mat e varzhonegoù. Keuz am eus n'em eus ket degaset ganin ur magnetofon bennak. Kaer am boa ober na zeuen a-benn nemet da skrivañ un tamm frazenn bennak, gwech an amzer. Er skol eo bet en Aberystwyth gant ar barzh T.J. Jones (1871-1949) a veze divuhez en a gentelioù, met leun o

dan pa dostae ouzh ar prenestr da lenn barzhonegoù. Ar varzhoniezh a zo ur grouidigezh : implijout ar rakvoud hag ar skeudenn evit krouiñ ur ster nevez. Ar barzh a zo un arzour. Hilda a c'houlenn digantañ sevel oberennoù eunoc'h evit tud evelti, e-lec'h furchal e donde riuù digomprenus.

«N'eus ket ganin a zondorioù digomprenus deoc'h. Ur weledigezh leun am eus hepken eus ar vuhez. Ar paotr yaouank hag ar plac'h yaouank n'ouzont ket petra eo ur plac'h pe ur paotr, met dedennet int an eil gant egile hag en em gompren a reont. Setu ar pezh a c'houlenn ar barzh digant al lenner : *edwaith* (respost).

Etre an div gentel e lavaran dezhañ ne oan ket ken laouen-se gant displegadurioù Dafydd Glyn Jones diwar-benn Sakramant an Aoter. Evidon-me, emezon, ez eo bezañ ar C'hrist er bara hag er gwir eo a gont. — Evidon-me ivez, emezañ. Arabat dezhañ va c'hemer evit ur protestant. Ar bara hag ar skeudenn hon eus hag ar C'hrist ivez. Ar rakvoud, ar skeudenn hag ur grouidigezh nevez a zo bezañ ar C'hrist.»

Tostaat a ran ouzh Harry Webb. Kompren a ra un tamm ar brezhoneg skrivet ha gant harp Paul Keineg en deus troet ur pennad bennak eus Maodez Glanndour. Dre e arz hag e vuhez ez eo heñvel ouzh Euros Bowen.

Da c'hortoz merenn e troan e brezhoneg unan eus kanaouennoù diwezhañ Dafydd Iwan :

Pam fod Eira yn wyn

Perak eo gwenn an erc'h

Pa welan poan ar glaouer, e wad war ar garreg

c'hlas.

Pa welan pelec'h 'veze ar beizanted o kribot

foenn d'e verniañ

Pa soñjan en tamm koad war c'houzoug ar

paotig psour

Ec'h ouzon eo ret din-me sevel evit va breur.

Gouzout a ran petra eo ar frankiz,

Gouzout a ran petra eo ar gwir,

Gouzout a ran petra eo karout pobl ha tir...

Sklaer eo ar c'homzoù, plijus da glevout pa vezont kanet, tost da brederioù ar bobl, met n'eus ket enno donder gweledigezh Euros Bowen. Graet int evit ur mare, ha tremen a raint gant an amzer.

Er c'hendiviz diwezhañ, e laka Euros Bowen dindan hon daoulagad goulennoù diwar-benn an *Eisteddfod* hag amzer-da-zont al lennegezh. An holl a zo a-du evit anvaz skoazell an *Eisteddfod* d'ar yezh ha d'al lennegezh. Evit E. Bowen ez eo arabat d'ar skrivagner diskouez nec'hamant evit amzer-da-zont ar yezh. Evit Harry Webb an deus ar skinwel efedoù disheñvel war ar pobloù hervez ar broioù. En Douar-Nevez ez eo bet mouget kultur ar bobl gant ar skinwel ; e Tchekoslovakia ne gomz nemet anezhañ ; e Kembre emañ hantet

-hent etre an daou all. Ret eo treiñ an oberoù kembraek e saozneg evit Kembrez digembraek, hag evit ar bed. D'ur goulenn graet ganin diwar-benn al lennegezh he defe ar muiañ a levezon war hini ar c'hembraeg, e responder din² : «Hini ar galleg». Hervez Euros Bowen, emañ Bro-C'hall «penn an arzoù-kaer, hag al lennegezh, hag e vefe lennegezh Breizh a-well mar gellfe sellout ouzh hini Bro-C'hall. Aes eo avat, kompren ar c'hil-stourm en abeg da enzalch Pariz e-kefever Breizh.

«*Bale Juluan Kadoudal*» am eus kanet en *Nosor lawen* (Nozvezh laouen), goude bezañ c'hwitet va emgav gant an «Hennessys» e kembraeg hag e saozneg. Ar pezh en deus plijet din ar muiañ eo ar sketchoù c'hoariet gant skofidi ar skol gembraek. Un doare aes da lakaat ar skol da vezañ plijus ha da zeskiñ frazennoù eeun ar yezh komzet.

Da unnek eur, ez on bet pedet gant Hilda Jones da vont da evañ te ganti. C'hoant bras em boa da vont, met skuzh e oan hag aet da gouket.

PORTHMADOG

Sadorn 14.8.71. — Div fitron eus Nefyn a zeu ganin em gwestur betek Pwllhef. Un ehan hir a-walc'h a rankan ober e Porthmadog evit komz gant perc'henn ar stal levrioù kembraek *Efionydd* eo anv ar c'horn-se eus kontelezh Kärnarvon (*Caernarfon*). Ur breur eo da W-Gwilym Tudur, *Stip y Peth* en Aberystwyth. Anaf eo pa sellan outañ a-dost : pennoù brun o deus o-doue Gwilym avat, en deus lezet da gouzhañ Jones, anv-familh e dad, evit mirout hepken e anv-badez. N'ouzont ket hag-ef an deus ar gwir d'hen ober hervez al lezenn saoz. Kalz a Gembrez yaouank a zoug e-giz anv-tiegezh anv-badez o zad. Ar stourmer Dafydd Iwan a zo unan anezho. Ar gerent o deus zoken ar gwir, hervez al lezenn, da lakaat *Ap* (mab da, ab) etre an daou anv. Anavezout a ran un tiegezhad bugale hag a zo anvet *Ap Dafydd*. An doare-se a heulit rik an hengoun. Mat, din-me da vilihanañ, e seblant un tamm a c'hiz kozh. Ewel-se e c'hell ar gembraegerien en am zizober eus stumm saoznekaet o anvioù : Jones (John's son), Williams (William's son).

Dont a ra Gwilym Tudur ganin betek va c'harr evit dibab levrioù brezhonek. En ur zistreiñ eo ret din antren en ur stal-frouezh da saludiñ ar perc'henn a zo ezel eus P.C. hag a zo laouen o kaout kaeier eus Breizh digant ar Breizhad.

En ur dremen e Llanystrudwy, e laka unan eus an tironnez ar gaoz war D. Lloyd George (1863-1945) hag e sverc'heien divalava. Evit gontit gaoz-mat an dud uhel, e c'houlenne evito an titl a *Sir* digant ar Roue. Ll. George, ganet e Manikinion (*Manchester*), a voe savet e

Llanystumwy, gant e vamm hag e eontr, war-lerc'h marv e dad e 1864. Eno e varvas e miz Meurzh 1945, ha goulnn a reas bezañ interet war ribl ar stêr *Dwyfor* en doa kemeret evel anv pa voe lakaet e renk an noblañs, e Genver 1945.

Kalz eus tud veur Gembre, zoken an hon amzer-ni, a zo bet enoret gant ar Gurunenn gant titloù pe medalennoù evit o labour, met anat eo e vez gwelet fall kement-se bremañ gant ar rummadoù nevez.

PWLLHELI

Ouzh taol e ti John ha Siani Roberts, e sav kaoz diwar-benn Hilda. Anavezet eo evel just, gant va mignoned. John a bouez war al labour sevenet gant ar merc'hed e strolladoù a bep seurt ha war-dro an ilizoù hag ar chapelioù : «Int-i e gwirionez, eo o dalc'h en o sav.» An itron a ro din da lenn ur pennad eus kelaouenn *Merched y Wawr* (Merc'hed ar Gouloù-deiz) diwar-benn Hilda Jones. Evit ar wech kentañ e klevan hec'h anv war e hed hag istor he buhez, nemet hec'h oad a zeu a-benn da guzh ? «Pa vin kozh, emezi, e prenin ur skinwel hag ur c'hi bihan bokser». N'he deus prenet nag an eil nag egile c'hoazh. E Llanrhaeddr ym Mochant ez eo bet ganet, e kontelezh Brycheiniog (*Breckonshire*), hag eno

eo bet skolaerez. Bremañ ez eo ezel eus kement kuzul a zo, katekizerez eo e skol-sul ar Chapel Wesley, reneraz strollad lec'hel *Merc'hed y Wawr*, ezel eus *P.C. ha Cymdeithas yr Iaith*. Ne guzh he menozioù ouzh den ; gant he zeod, gant he daoulagad lemm e tifenn grofs ar stourmeriezh yaouank toullbac'h et.

Goude koan, ez a John ha me d'ober ur vale adenn war-droad betek ur vérauri. Daou gidefved a zeu a-benn hent dimp. Ur véreuri a «c'hiz kozh» a zo amañ, eme va c'hompagnun a anavez mat an dud. Izili int eus Chapel ar Vade-zourien, hag an itron a heuilh emvodoù *Merched y Wawr*. Setu hi o tont er-maez da welout petra 'zo. Hor pediñ a ra da vont betek an-ti, ha kemer a ra ar c'hizhier hoc'h eus ?

— O ya ! Unnek am eus ha ret eo din teurel evezh outo.

Goude ur pennadig kaoz war an hent, e tistro-omp d'ar gêr. «An itron-mañ a oa kelenneraz war ar fizik en ur skol-etre. Pebezh kemm en he buhez ! N'he deus ket a vugale, hag un dra vat eo eviti plediñ gant kizhier».

(da echuiñ)

NOTENNOU

(1) Kement ha reiñ ur skouer eus barzhoniezh Euros Bowen, e lakomp ar varzhoneg-mañ, tennet eus e levr *Achysuron* (1970), paj. 13.

Y WENYNNEN F&L

Mae 'r dyddiau rhwng glaw a gwyl
 yng ngrug y waun
 ac ar ochrau 'r meysydd
 yn edrych y wlad,
 casglu ei hinddanau
 a liw ei goleuni
 wrth fôn petalau
 ac yng nghanhennau 'r neithdar,
 adenydd ysgafn
 dyddiau 'r wenyenn
 yn bwydo ar berthi 'r byd,
 yn hamddena,
 yn amynnedu,
 hyd donnau mân arogi a blodau,
 melo,
 a'r pethau disylw 'n
 dychwelyd
 yn drwm gan flawd
 i borthladd y cwch
 Briwion gair a golwg
 Rhwng glaw
 a gwyl
 mae iddyn-nhw adenydd
 y wenyenn f&L.

AR WENANENN

Emañ an deizioù etre glaw ha tefval
 e brug ar waremm
 ha war gostezioù ar maezioù
 o sellout ouzh ar vro,
 dastum hec'h amzerioù brav,
 ha liv he gouloù
 ouzh gar ar petalennou
 hag e skourrou ar sun-bleunioù,
 iskilli skañv
 deizioù ar wenanenn
 o voueta war vodoù ar bed,
 war he goar,
 gant pasianted,
 'hed tonnoù munut frond ha bleunioù,
 melo,
 hag an traoù disellet
 o tistreiñ
 ponner gant bleud
 da borzh ar ruskenn
 Bruzhun ger ha gweledigezh
 etre glaw
 ha tefval
 ez eus dezho divaskell
 ar wananenn.

dibenn paj. 5.

Anjela Duval

War hent an distro

Diskuiñhañ 'ranke du-mañ du-hont
 Ponner e choukad da foetañ hent
 Ha ponner e galon, e rann-galon.
 'N ur mare fall en doa divizet distreiñ
 'Oa ket ac'hub war ar chantieroù.
 Edo war-nes semplañ gant an dic'hoaneg.

Tefval ha sioul 'oa an iliz kozh.
 Pediñ 'reas, evel pa oa bugel,
 Dirak skeudenn an Itron Varia.
 Ur beleg a grogas da c'hoari war an ograou
 Evitañ e-unan marzeza
 Pe 'vit Itron ar Wir Sikour ?
 Pa 'vit ar vaouez kozh daoulinet
 O tibunañ deol he chapelad.
 Pegit e chomas eno beuzet er sonerezh ?
 An holl amzer en dos. Den n'hen gortoze.

Ha setu ar vaouez kozh o sevel
 O tennañ ur gantol eus he godell.
 Un enaoutenn eus ur voestig
 Hag o lakaat he gouloenn dirak ar Werc'hez.
 Sevel 'reas ivez an den ha tostaat.
 — Mamm-gozh, emezañ, sioulik,
 Ha c'hw' gred e galloud ar gantol-se ?
 — Sur, emezi, e kredan.
 Ha sed evidoc' h-c'hw' ha ne gredit ket
 Setu ma lakan ur gantol all.
 Hag ouzhpenn setu ivez da heul
 Ar pezhig gwenn-mañ hag
 Unan all evidoc'h.

Stirlink munut an daou bezhig
 O kouezhañ a-gevret er plad
 Kollet e sonerezh gregorian an ograouer,
 Doare iskis ar vaouez kristen
 Aergelc'h espar an iliz-veur tefval...
 Fromet holl betek an daeroù
 'Oa bet ar foeter-hent
 Hogen skañvoc'h e kavas e choukad
 Pa hen sammas a-nevez er porched.

18 Mae 1974.

Marv va c'hi kozh

... Kalonig feal !
 Chadenn all na anavezjout, Fido
 Nemet ar chadenn-se a garantez
 Az stage ouzh da vestrez.
 'Oa ket ur chadenn houarn
 Hi 'oa ur chadenn aour
 N'eo ket ur chadenn a vezh
 N'eo ket ur chadenn a sklavelezh.
 Adalek da gammedoù kentañ
 Betek da bazioù diwezhañ
 Out bet atav war va seullioù, Fido !
 En ti, er porzh, er park
 Ha dindan va gwele zoken
 Pa vezen klañv, Kalonig feal !

Nag ur rann-galon evidon
 Toullañ dit da vez el liorzh.
 ...E ballennet 'm eus a c'heot frondus
 Hag a vokidit-laezh dishillet.
 Da zouget 'm eus 'n ur grenañ
 Etre va divrec'h...
 Da c'hourvezet war ar bleufv
 Mailhuret 'n un dafañjer kozh
 Da c'holoet a zeliou beuz ha roz-kaouled
 ...Paliad ha paliad, evel ul lid sakr,
 Em eus lakaet da gouezhañ
 War da gort difriiv an douar bev
 Ha dour benniget un daerenn.

Kousk bremañ, va loenig mat,
 Kousk e Peoc'h da viken.
 Graet eo ganit da vuhet ki
 Da zever a gi : karout ha beilhañ.
 Kousk, Fido !

25 Meurzh 73.

Barzhoneg all paj. 13.

Ivona Galbrun

E KASTELL GWION (1)

Bro-Aovergna : Mezheven 1974

Ha me distro eus va zrioad yac'hadennek e Bro-Aovergna, e tarnij bepred em ehvor ar pezh o deus gwelet ha taolennet va daoulagad eus al lec'hioù-se, dreist-holl Kastell-Gwion⁽¹⁾ ha Kêr-Riom. Rak da Kastell-Gwion e oan bet aliet da vont en abeg d'am yac'hed. Eno ez eus mammennoù dour-tomm leun a glorur magnezion hag a ra vad d'an avu ha d'ar laouelloù. Anavezet e oa an dourioù-se en amzer ar Romaned, met dilezet e oant bet ha ne voent brudet en-dro nemet adalek dibenn ar seitekvet kantved, hag abaoe d'eroù an ugentvet kantved ez eus bet roet lañs dezho da vat. Dourioù tomm: etre 27°5 ha 38° ez eo ar vrez anezho.

Pa gomzer eus Aovergna, na petra 'ta, e komzer eus ur vro veneziek. Kastell-Gwion n'eo ket pintet gwell-uhel : 406 m uhelder, met na pegen meurdeuz an dremmwel ! War-zu ar c'hornog ez eo digor ha ledan, rak etre ar menezioù — ha ne dint ket na begeh na re uhel — ez eus tachennoù-bro frank. Eus prenestr va c'hambri, e krec'h kêr g-Kastell-Gwion, eo bet ur frealz evidon dizoleiñ an dremmwel-se en ur zegouezhout eno, ha me skuizh a-walc'h gant va beaj, hag ivez — hen arzav a rankan — doaniet ha ma oan o vezañ rediet adarre da guitaat Bro-Dreger. Digustum e oan da vont gant an trenioù, da vale ken pell, ha sammus e oa ur seurt beaj evidon. Dre ur prenestr all, en trespas, e skoe ar wel war bennoù menezioù uheloc'h hag a seblante bezañ tost. A-dreñv dezho, beg ar Puech Doma, mouchet peurilesañ er vrumenn. Ur beurevezh zoken e oa warnañ tachennadoùigoù gwenn a erc'h... E mezheven ! Gwaskedet a-walc'h ez eo Kastell-Gwion ; skañv an aer eno ha plijus da zialaniñ. Merzet buan e vez an div rann oc'h ober kêr : lod an dourioù ha lod kêr.

En hini gentañ, en un drañlienn goadec, ez eo kempennet ha peurkempennet pep tra, adalek ar vali vras a gas eus ti an hent-houarn da greiz kêr : ostalerioù, tiez-degerner, tiez-kenwerzh a seurt a gaver e kement lec'h prientet da vezañ dedennus d'as dud a zeu di da dramen ur pennad-amzer. Stank-ha-stank ez eo an tiez eno,

dezho dre vras, neuz savadurezh 1910/1925. Dalc'het kempenn avat, glasvez ha fliorzhou bleuniel en-dro dezho alies.

E traoñlienn an dourioù, e valeer da gavout a lec'h da lec'h ar stivelloù ma fliotr an dour dioute dibaouez dre gorzennoù, pep a anv-badez dezho, un anv-plac'h : Ivona, Suzanna, Loeiza, Garmenig, dindan savadurioù gwerennet bihan pe vras, aozet diouzh na vefent ket re anat e-mesk glazur ar gwez tro-dro. Da euriou an evadennoù, e vez a-leizh a dud ; en-dro d'ur c'hazenn bevegnet a vleuniou ez eus kadorioù niverus d'ar re a gar, d'ober un diskuizh warno ; o vont hag o tont, tud a bep seurt hag a bep oad, darn diampart a-walc'h, darn o vont drantoc'h war-raok, pe neuze strolladoùigoù tolpet eno da zivizout — da glakenniñ am befe c'hoant da lavarout kentoc'h. War grap a-us da lec'h an dourioù emañ ar tiez-degerner lorc'husañ ; bras hag uhel e sked o frenester niverus ; lec'hiet brav, war zirabañs, o fliorzhou, hep na noazfe an eil ouzh egile hep na sammfent pe na zistumfent linennoù naturel al lec'h. Bez' ez eus hentoù evit ar c'hirri da c'hoari tro evit tizhout an tiez-se, ha dre-se e chom ar «park» (ar c'hourfiorzh, mar kavit gwell) en e bezh, didrouz a-walc'h.

Un diforc'h — plijus evidon — a oa dilezel ar greizenn-se evit pignat war-zu kêrig Kastell-Gwion, dezhi ur stumm dibar gant he ziez izel a-walc'h goloat a deol ruz stardet an eil e-kichen egile, oean a-walc'h o stumm diavaez. An iliz-parrez iliz Santez Anna, mar plij, pignet uhel, nepell diouzh tosen ar Groaz 'lec'h na save gwechall ar c'hastell kozh : kastell Gwion II, kont Aovergna, hag a roas e anv da gêr : Kastell-Gwion.

Tiez-kenwerzh : boued ha listriaj a zo hed-ha-hed ar straed a grap gant ar gêr gozh. Dias eo avat, anaout tud ar vro diouzh ar re all, gant ar bobl a vez eno e kement korn a zo : tiez, rannioù, kambroù feurmet d'an dud diavaez e-pad o marevezh-yac'haat (yac'hadennoùrien a vez graet anezho) pe c'hoazh a-leizh a Spagnoliz pe

Bortugaliz deuet di evel da gement a lec'hioù all da glask repu ha labour ! Kirri-tan a bign gant ar ruiou, nemet merket strizh eo dezho an tu da vont gantañ ha setu ma valeont goustadik hag evezchiek. Santout a reer ez eo prederiet pep hini gant ar c'hoant da virot un aergelc'h peoc'hus. Dis-heñvel ez eo diouzh an doare birvidigezh a vez en-dro deoc'h pa ziskennit gant ruiou kêr-Lannuon, da skouer, ha diouzh an doareoù nervernek ha prederiet a vez gant an dud eno ken alies !

Ne oan ket o klask bale bro nemet em eus bet tu kouiskoùde da vont betek kêr Riom — kêrbenn gwechall Bro-Aovergna — hag anat eo warnañ (gourel eo an anv, a-hervez⁽²⁾) e neuz a gêrbenn ! En ur implijañ kaerig Sindikad an Douristelezh (S.I.), hon eus gwelet an hanter eus kêr : n'hor boa ket kalz a amzer hag an itron a oa deuet ganin, a valee goustadik ha fall e oa he daoulagad. Tour an Orolaj, an Ti-Kêr, iliz Itron Varia ar «Marthuret» gant delwenn «Gwer'hez he labousig», iliz roman Sant Amable, tiez a bep tu d'ar straed, tonius-bras gant o dorioù meur o vont betek porzhioù diabarzh, enne skalieroù-trog gant mogerioù warno kizelladurioù kaer. En ur vont gant ar ruiou troidellus a gaver o tistreiñ, e vezer evel beuzet er c'hantvedoù tremenet, pa weler ouzhpenn a-us d'an toennoù beg uhel (ha moan a-walc'h) un tour kozh chomet aze en e sav, abaoe pegeit⁽³⁾ ? Dre un toull etre daou bezh peul-maen — lec'h d'un nor gwechall moarvat — e kuitaer ar gêr gozh d'en em gaout gant ur vali ledan a ziskouez ez eus bet fellet da Riomiz mirout d'o c'hêr he ferzhioù a gêrbenn betek ar c'hantved diwezhañ, rak tiez eus ar c'houlz a gaver meur a hini anezho war un tu eus ar vali. War an tu all ez eo boutin an tiez ha divalav a-walc'h, nemet dre ma'z int izel e c'hell ar sklêrijenn skeiñ brav tro-war-dro.

Ar gêrbenn a-vremañ, Klamont-Ferrand n'emañ ket gwall-bell hag e-skod-se e seblant Riom — diwar ar sell buan a oa hon hini — bezañ un tamm war ziskar. Miret en deus avat, e neuz arzel, kaer ha plijus.

Ret eo din menegiñ ber-ha-ber ar pezh am eus bet tro da welout ivez e-pad va zremenadenn e Kastell-Gwion : ur strolladig korollerien ha kaserien giz al Limouzin izel. Kempenn an traoù gante. Savet ez eo bet em fenn e-pad ma sellen oute ar soñj d'o c'heñveriañ gant doareoù hor c'helc'hioù keltiek. Ma'z eus gante, da skouer, korolloù a-dal, kelc'hioù-tro, balioù d'arou-ha-daou, kar dre o stummoù ouz ar re anavezet e Breizh, ez eus un diforc'h bras, na pa ve kan, dre ar paz implijet a ya bepred dre di lidazev anev-

zet ar Bourreia), tra ma'z a dafeoù Breizh dre ur rann a bevar, ha dre-se ez eo disheñvel al luk.

Pezh an doa plijet din ivez e oa klevout ar penndispleger o listagañ frazennoù en o fezh a yezh ar vro (ur rannyezh eus Yezh Ok) brav ha dic'hek ; darn eus an arvestourien a seblante kompren, ha da vihanañ ar c'hoarierien a re, anat e oa... Evel binvioù-seniñ e oa gante ar gabreta⁽⁴⁾, ur seurt binvioù gant ur c'hwezigezh o vont en-dro dre an ilin, ha neuze ar viel — anavezet — violoñsoù hag akordeoñs.

Dilhad ar merc'hed, kenkoulz ha re ar baotred, a oa diwar ur c'hiz kozh : eus ar c'hantved tremenet e seblantent bezañ. Brav e oant douget ha brav o livioù dilur, hep an neuz «dic'hizet» pe lakaet a-dreuz, pe leok, a vefa marteze da damall c'hoazh da strolladoùigoù 'zo eus Breizh. (E-keñver koefoù bras ha mouchoueroù Bro-Dreger, na pa vez ken !)

Plijus eo gwelout ar berzh a ra e pep lec'h, an doujañs da andorioù ar sevenadur, da lavarout eo, da ziazezoù personelezh pep poblañ.

E Kastell-Gwion eta, em eus tremenet brav a-walc'h evel-se, an amzervezh divizet. Deuet en-dro bremañ er gêr eo gant levnezh em eus adkavet an dremmwel a zizoloer pe vez brav a-walc'h an amzer : betek Menez-Bre gant glazur ar gwez ha linennoù kaer toennoù tiz Lannuon, war an tu-se, savadurioù kozh ha meurdeuz darn anezhe. Ken kempenn en em gav an daolenn, gant iliz Berlawenez an tostañ, ken me seblant evel un draadenn prientet a-rotoc'h evit un arvestad. Armañ avat, e vez evel alies, nemet diouzh an tu ma c'hwez, ha gant na vezo ket re grañv, e vez kan glan an aer hag hini Kastell-Gwion, a gavan-me, da vihanañ !

NOTENNOU

- 1 Kastell-Gwion : Chastel-Guion ar c'hartennoù-douaroniek.
- 2 Moarvat en abeg da orin an anv : Ricomagos, Ricomagenas Pagus. Hogen n'eo ket dav heuliañ ar c'hiz-se evel m'hon eus graet.
- 3 N'eo ket meneget an touz-se war al levrig-heñchañ a oa ganin.
- 4 La Cabreta, distaget da Cabreto e rannyezh Aovergna (chabrette e galleg). Diwar ar ger cabre (gavri) e tau dre ma vez graet gant ur c'hroc'heñ gavr. Cabreta a dalvez c'hoazh : gavrig.

RIMASTELLOU

DIGERIA

*Kontadenn Mari-Vardell
A oa aet da gousket 'mesk ar stoup
Hag he doa torret he goug
Me 'ray bremañ 'vel ar c'hoailh
An durzhunell, an eostig-bailh.*

GOUELIOU

*Pardon Pêr a vez kêr
Eno 've pifaou ha taboulinaou
Ha tud dindan an armaou
Hag ur prosesion kêr
Oc'h ober an dro d'ar vâered.
(Plouc'ha)*

*Malarjez ! Malarjez, me 'garte e padfe bemdeiz
Hag an eost div wech ar bloaz
Ha gourmikaël bep seizh vloaz*

*Merc'her ar Mieur goude al Ludu
Soubenn an ognon ne vez ket druz*

*Merc'her al Ludu diouzh ar beure
'Vez estonet ar vugale :
Pelec'h eo aet Sant Malarjez ?*

*Ur Bloavezh mat a souetañ
D'ar vreg, d'an oac'h eus an ti-mañ
Avantur vat d'ar vugale
Ha yec'hed d'o zud da chom gante.*

An enor : ur sant kozh ha na vez ket e ouel.

*Salud deoc'h, Pastor santel !
C'hwî a brezeg an Aviel.
Deuet on a galon vat
Da hentiñ deoc'h ur bloavezh mat
Ur bloavezh mat hag evurus
Ha lod eus baradoz Jezuz.*

KLEIER

*Laññev :
Ar c'hloc'h bras : Laññev basour
'n eus nag arc'hant nag aour.
Ar c'hloc'h bihan : Evel ec'h omp, ec'h omp.*

*Ploubêr-Tonkadeg :
Kloc'h Kerfoñs : Gisti ha Iseron ar Gêrveur,
Kloc'h ar Gêrveur : Evel ec'h omp, ec'h omp.*

12

CHAPELIOU

*Bried (enez) : Itron Varia a Gerrouz
Laket hoc'h avel d'ober trouz
Na zeuy ket tud an douar bras
Da zebriñ hor fav e gles.*

GIZIOU BEVAN

*An hini a zo pedet da ur pred
A zo gwall sot ma ne da ket
C'hoazh e ve kalz gwelloc'h dezhañ chom er gêr
Ma ne oar debriñ hag evañ gant moder.*

*Pelec'h emañ da vignon gwellañ ?
'lec'h ma soñjez pa az pez poan.*

TON DAÑS

*Marv è Kergrabin-grabin
Marv è Kergrabin gozh,
Ouzh in dibeiñ, ouzh in ivañ
Ouzh in flapañ yod en e gof.
(Yezh Plual)*

PRIEDELEZH

*Adieu d'an dañs ha d'an ebat
Pa renk ar c'havell ruskellat (luskellat)
Elet an dorn, elet an troad
Aliesoc'h elet ar stag.*

elet = a-ere.

BOUED HAG EVAJ

*Erru eo an oac'h da glask e goan
Daou deiz 'zo n'en deus bet tamm
Am ! Am ! Am !*

*Picheraig dour (= picheradig)
Torret ar picher
Ha fotet an dour.*

LABOUSED

*Da lakaat ar vugale da reiñ peoc'h :
Aozañ boued d'ar c'houlmed,
Pesked sail o deus debret,
Ridellat ! Ridellat !*

houidi ha roned :

*Ur ran : 'Peus ket gwelet plat e veg
Nag ivez rod-kan ebet ?
Ar roned : Rik, rak, rik, rak... h.a. ...*

*Ur ran : N'hoc'h eus ket gwelet havre
Ar pennoù plat o vale ?*

*A bep eil an holl roned:
Na te, na me, na te, na me...
(buanoc'h-buanañ !)*

*Moualc'h : 'Peus ket a vutun (bis)
Kae davit, kae davit, kae davit !*

C'HOARIOU GANT AN DORN

*(Tapout an dorn) Dornig, mar, mar, mar
(O skeiñ en dorn) Flip ! Flip ! Flip !*

Anjela Duval

*Kae d'ar gêr da glask da varm
Pikouz (bis), kae d'ar gêr da glask da varm
Pikouz kamm !*

KONTAN BOUTONOÙ AR CHUPENN

*Den onest !
Den kaer !
Marmouz !
Dogan !
Laer !*

KENAVO

*Kenavo 'vit an deizioù
Yec'hed mat d'az kostezioù
Ha Doue d'ho kresko
Ur meutad a fri
Ha daou a c'henou.
(Paotr Juluen)*

Santad bugel

*Ar garantez-se 'vit ar gwez ?
Abaoe va oad tenerañ,
Ma flouren o fluskenn
Gant va dorn babig.
Ma pegen outo va skouarn
Da selaou sârac'h o deil
Boubou o skourmoù o weañ en avel foil.
Ha strak o briñsoù sec'h o tenniñ,
...Ma striven da gratat uhel-uhel
Bepred uheloc'h. A varr da varr.
Labous hep askell !
Ha bamañ alese ouzh an dremmwel.*

*...Ha na displejus an diskenn
Ha teurel adarre troad war douar !*

*Gwez va bugaleaj, livirit din 'ta
A beloc'h a teue din-me ez-vihan
Ur garantez ken don evidoc'h ?*

*Marteze on bet gwezzann
en amzer gent...*

Gouere 74.

13

*«Hag e choment sebezot, rak pep hini a glev anezho o kornz en e yezh e-unan.»
Oberoù an Ebestel 2, 6.*

Burzhud ar Pantekost a c'helle bezañ bet an drama : ar selaouerien o defe komprenet yezh an ebestel. Abegoù a oa da soñjal e vefe bet ret deskiñ yezh ar C'hrist evit anavezout e Geloù-mat. Hag e c'hoarvez ar c'hontrol bev : Burzhud ar Pantekost a zo klevout an Aviel, peb unan, er yezh desket gantañ war varlenn e vamm. Kement-se avat, a zo sklerijennus-tre. Petra 'ta a sav diwar Spered Doue ? Petra a zivian eus ar Spered-se ? An unander en dishefveldeorioù. An unander dre ar feiz.

«O c'hlevout a reomp o tiplegañ en hor yezhoù oberoù-kaer Doue» (*Oberoù, 2, 11*). An taolioù-kaer-se, Pêr a embann pere int. Buhez, marv, dasorc'hidigezh ar C'hrist-Jezuz ha donezon ar Spered Santel. Da lavarout eo : Doue o kenderc'hel gant e Oberenn a Silvidigezh. Emglev kentañ Menez-Sinai klokaet gant un Emglev Nevez, an hini m'eo ar C'hrist hanterour anezhañ, kannad ahezhañ, maen-korn anezhañ, evit an hollved, evit an holl dud.

Fraezh eo neuze danvez ha liv an unander a zo hervez Spered Doue. Kinnig a ra ar Spered-se d'an den en em stagañ ouzh an traoù pouezus, ouzh an traoù diazez, prezeget gant an Ebestel, un nebeut pennekredennoù hag a lavar dimy oberoù-kaer an Aotrou Doue evit salviñ mab-den. Ya, un hin nemet soubet enni al liorz : ar feiz a Darvoudoù Meur Istor Renevezdur an dud hag ar bed. El liorz avat, pep frankiz da sevel bleuniou a bep gouenn, a bep liv, a bep frond, bleuniou dishefvel. «Pep hini a glev anezho o kornz en e yezh e-unan.» An unander dre ar feiz. An unander dre ar garantez.

«Pa'z eo c'hoarvezet an trouz-se, ez eus deredet un engroez vras a dud, hag e choment sebezot.» Mail a zo ganto dont da selaou ar brezegerien nevez. Met n'eus bet nag archer, na poliser war o zro, evit o c'herc'hat. Oberoù-kaer an Doue Bev a zo kinniget d'o c'haliou : netra dre heg. N'en em stag ouzh ar Bobl Nevez nemet ar re a fell dezho. Ya, un heol nemetañ o tommañ al liorz : ar garantez, ha bleuniou a bep seurt oc'h en en zispakañ seder, dieub, kichen-ha-kichen. Sed aze an unander gwir, yac'h. An unander a bed. An unander-se hag a zo ton dudius mil ha

mil son dishefvel.

Abadenn ar Pantekost, er penn-mañ eus hon amzer, a zo da lakaat kefver-ha-kefver gant un abadenn all er penn all eus an amzer : hini Tour Babel. Petra eo Tour Babel ? Ur savadur gwintet ken uhel ma vefe bet gwelet eus pevar c'horn ar bed, gant an holl dud. Bodañ an holl dud dindan o beli dezho a oa youl feuls saverien an tour-se. O menoz a oa lakaat o c'hraban war holi bobloù an douar. Fellout a rae dezho seveniñ unander ar bed, drezo o-unan, ganto o-unan. Hag e weler an dud-se o chom berr. Ne zeunt ket a-benn da ober un denelezh unvanet.

Ne c'hellont mui en em gompren. N'eus mui tu d'en em glevout. Hag ar vojenn veur-se a lavar e teu ar yezhoù da vezañ mogerioù, speurennoù etre an dud. Ha pep pobl a rank mont kuit pep unan diouzh he zu.

Ha koulskoude mañsonerien Babel a ro an dorn an eil d'egile, evit kiañ, a-gevret, war an hevelep labour. Daoust da se ez a d'an traoù o unanded. O si a zo kaout o gwalc'h ganto o-unan. O si a zo teurel, dre vac'homerezh, war an dud all, war bobloù all, ur raktres, ur menoz, ur yezh, ur stuzegzh, ur c'hultur, ur feiz, un ideologiezh... o hini dezho. Rediañ a reont an holl d'en em stagañ groñs ouzh «un dra bennak» pe ouzh «unan bennak».

Mojenn veur Babel a zo eta Spered Glan Doue o kelenn dimp, anat-tre, ez eo fall-put kement gouennelouriezh, kement holvelouriezh, kement impalaerouriezh, kement raktres ha kement pennaenn direndaelus, ret-mat plegañ dezho. An holl Vabelioù o deus ar bobloù, ar broadoù, ar Stadoù, an impalaeriezhoù klasket sevel, an holl ideologiezhoù groñs, diblegus, otus a zo bet gwintet war-du an oabl, holl ez int savadurioù divegenn pe frailhet, tarzhet pe kouezhet en o foull, atredoù nemetken anezho.

Ar Pantekost a zo eta un diarbenn da v-Babel. Ne zeu ket ar Spered Glan da sevel ur bagad emsaverien evit aloubiñ an douar a-bezh, e-skeud an hevelep banniel. Ne zeu ket evit mougañ ar menozioù liesseurt, flastrañ an donezonoù, ar perzhioù dishefvel. Ne zeu ket evit drastañ ar yezhoù. Ne zeu ket da vroudañ a-benn sevel un ander unmañel, ha skuzhus-marv. Heug en deus eus an unstumm hag eus an unton. Penaos a vefe a-hend-all ? Pa ouzer eo Spered un Doue, hag a zo Doue an dishefveldeorioù, Krouer an

dremmoù denel, kemmoù atav etrezo adal an den kentañ betek an den diwezhañ...

Dont a ra avat ar Spered da zibadañ ur Bobl Nevez. Ur Bobl ec'hon, frank, digor, ledan, e-lec'h ma vo brav da bobloù liesseurt bevañ, unvanet dre ar garantez-se. Ur garantez a zo doujañs rik evit an hini a zo dishefvel. An unander nemetken a c'hell bezañ gouelet, a c'hell padout ; gantañ e c'hwezh dalc'hmat avel ar frankiz.

Pobl Doue — an iliz — ne c'hell ket eta ankounac'haat deiz he ganedigezh e tan hag e avel ar Spered Glan. D'ar Pantekost, ur Bobl Nevez a zo bet galvet d'en em vodañ, d'en em strolañ. Ar Bobl-se avat, a zo ur boblad hag a gan e mil yezh. Ur Bobl eo hag a zo graet gant bobloù, dezho dremmoù dishefvel. Evelato, eo douget hag eo bet douget izili an iliz, evel mard eo ar Stadoù, da fardañ unanderioù diwir, fias, o vresañ ar frankiz hag o vac'hagnañ an emglev. Nann, n'eus ket ezhomm drailhañ ur bern gerioù evit lakaat anat ned eomp ket a-enep Spered ar Pantekost, ni hag a fell dimp e padfe hag e vleunfe hor yezh, ur gevredigezh vrezhon, ur bobl vrezhon, un douar vrezhon, betek ma skedo «an douar nevez hag an neñvoù nevez».

A-du gant steuñv Doue war an dud ha war ar bed — ur steuñv a zishefvelde — a-du omp eta gant an dishefveldeorioù.

Ne c'hellomp ket gouzañv e vefe miret ouzh den ebet, ouzh kenel ebet, d'en em ziorren, d'en em zispakañ hervez ar pezh a zo douget e donderioù ar galon, hervez al leve speredel ha danvezel dishefvel berniet gant ur vroad, gant ur boblad. Ne c'hellomp ket bezañ a-du gant ar re a stlap war ar bed roued o c'healiou hag o steuñvoù — o re dezho —. O ger a zo unan, met unan a dalvez bered evit ar re a ya ganto. Ne c'hellomp ket bezañ a-du gant Keoded Babel. Gouenn a reomp digant iliz ar Pantekost bezañ ul lec'h a frankiz evit ar yezhoù, da lavarout eo evit un den dishefvel diouzh un all, evit ur bobl

dishefvel diouzh ur bobl all.

Gouenn a reomp digant iliz ar Pantekost, a zo iliz «Doue ar re veu», a zo iliz ar C'hrist bev a-nevez, morse a-du gant ar marv, gouenn a reomp ouzh an iliz-se ober pep tra evit ma chomo bev-buhezek pep pobl eus ar bed, evit ma adkavo yec'hed ar bobloù toc'hor evel hor hini, evit ma ne vo mui kendeuzet kenel ebet. Gouenn a reomp digant an iliz enebñ kalonek ouzh ar re a venn mougañ ur vroad evel broad a-ziforc'h. Gouenn a reomp klevout alies e-kreiz iliz ar Pantekost lavarennoù evel ar re-mañ :

«Mont a ran evel servijer... doujañs ennon e-kefver an dishefveldeorioù, a ra eus an iliz ur genunvaniezh ha nann ur strollad bennak hefevlu-buhez pep tra ennañ...»

an eskob Tomaz eus Ajaccio.
«Dont a ra ar yezh da vezañ ur benveg evit eztaoliñ bed diabarzh an den... Nag eürus on o c'helle ar bobl pedif ha kanañ e katalaneg.»

kardinal Jubany, eskob Barcelona — mae 1974.
«Ur yezh mivedel a ro d'ar bobl euzkarat ur bersonelezh dezhi hec'h-unan.»

eskob Añaveros Atañ eus Bilbao — 2/74.
Homilienn eskob Vizcaya a vefe da anavezout penn-da-benn, hag hiziv, da-gevret Gouel kentañ ar Brezhoneg, eo un dead evidomp, a-greiz-kalon, embann uhel ha splann anv ar pastor Anton Añaveros, a c'hellomp e gwirionez envel «diouganer ar broadoù bihana».

Ya, bezomp kilvizienn an unander en dishefveldeorioù : Spered an Tan hag ar Mab a vo ganimp. Bezomp saverien an iliz hefevlu ouzh hini ar Pantekost kentañ : ur Bobl Nevez graet gant miliedoù a bobloù dishefvel. Un iliz, Pried Santel ar C'hrist, gwisket gant ur c'haer a vantill marellet.

Gouenn a reomp start ma vefe un tammig gwenn ha du o lintrañ war ar vantill-se. Bramañ, warc'hoazh hag e dibenn an amzerioù, pe ginnigo Jezuz an iliz d'e Dad. Setu hon hunvre meur, hon goanag divral, hor stoum pemdeziek.

Y.T. Gwengamp — 2/6/74.

Klery

ANVIOU-LEC'H BRO-BLOUVAEL

PONT TERRET

E-touez an anvioù hag a dap padout a-dreuz ar c'hantvedoù emañ anvioù ar stêrioù hag ar menezioù, setu perak, en hor studiadennoù war an anvioù-lec'h, war *Varr-Heol*, e klaskomp da gentañ ar seurt anvioù-se.

Un anv a-bouez e oa anv al lec'h ma treuze un hent bennak ur stêr, ur stêrig, pe zoken ur wazh-dour dister. An nebeutañ ar gwellañ a bontoù a veze savet hag e klaske an ijinourien-hentoù al lec'hioù ma veze bas an dour, da lavarout eo ar Roudouziou. E gwirionez e oa deuet ar ger *Roudouz* da vezañ alies un anv o verkañ treizhadenn n'eus forzh peseurt gwazhig, zoken 'lec'h ma oa trawalc'h ur gammedig d'he zremen. Ac'hano an anv *Roudour* ha *Roudouroù* a gaver niverus e Bro-Dreger. Ar ger *Roudourtoù* a zo un eil stumm eus ar ger *Roudouziou*, diwar **Rotwydd* pe **Rodwydd*, an *dd* eus dibenn ar ger o treiñ ez-reoliek da *r* pe o kouezhañ. Setu perak e kaver ar stumm *Rotue* (*Rotué*) e Breizh-Uhel, *Roudouz* ha *Roudour* pe zoken *Roudou* e Breizh-lzel.

N'eo ket ar ger-se eo a fell dimp studiañ en dro-mañ, met ar ger *Red* o klotañ gant ar c'hembraeg *Rhyd* hag ar c'herneveg *Res*, hag o talvoud *Roudouz*.

Ar ger *Red* a zeu diwar ar c'heltieg *Ritos*, **Ritum*; hen kaout a reer da skouer e *Cambroritum* (*Chambard*, e galleg), da lavarout eo *Roudouz* ar *Gamdrienn*. Evel m'emaomp o paouez hen merkañ, e kaver e kembraeg ar ger-se dindan ar stumm *Rhyd*. Un anv gwregel ez eo, pe da vihanañ e oa, rak techet ez eo da dreiñ e gourel bremañ :

Rhyd Fawr = Red Veur (vras), Roudouz Veur
Rhyd Fechan = Red (roudouz) Vihan
Rhyd Feien = Red (Roudouz) velen
Rhyd Galet = Red (Roudouz) kalet, h.a.
 Kaout a reer c'hoazh y *Foryd* evit *Mor-Ryd* = Roudouz-Vor.

Kudenn abet da heul an daou anv-mañ, evit pezh a sell ar reizh anezho :

Dwyryd = div Red, div Roudouz
Tairyd = Teir Red, teir Roudouz.
 Mar seller ouzh ar c'herneveureg, lakomp geriadur Morton nanoc'h (Saozneg-Kernaveureg), e kaver evit ar saozneg *Ford* (Roudouz) :
Ford : n. *Res*, f. pl. - *yow*, *basdowr* m. pl. - *owv*;
Rojyth (*Roswyth*), m. pl. - *wydhov*.
 Lazel a reomp a-gostez *basdowr* (= **basdour*)

ha *rojyth* = roudouz, evit derc'hel kont hepken eus *Res*, anezhañ un anv gwregel gant an a dibenn diwar *d*, evel ma oar kement hinien deus studiet un tamm ar c'herneveureg, cf. *Tas* evit *Tad*.

Er brezhoneg komzet, ne gaver mui war a seblant, ar ger *Red*, nemet en anvioù-lec'h. En e c'heriadur henvezhonek, paj. 297, e studi an Ao. Fleuriot ar ger-se dindan ar stumm *Ret*. Lavarout a ra emañ «marteze» ar ger *ret*-se en anv-lec'h *Pennret* a gaver e Kartular Redon. An anv-mañ, deuet da vezañ *Perret* - *Perred*, a zo anv ur barrez a Gerneve, eus kanton Gwareg.

Bremaik e welimp ez eus tu da reiñ un eil ster d'ar ger *Red* hag a c'helle bezañ muioc'h diouzh grad ar geriadourour meur.

Etre Sant Gouenou ha Plouzal (*Plessala*), e kaver an anv-mañ : *Pont-Terret*, skrivet a-wechoù *Ponterret*. Netra ken nemet a sellout ouzh lodenn an anv a c'heller kompren *Ter-Ret*, *ter* o vezañ ar stumm anavezet-mat eus *teir*, ha *ret* o vezañ ar ger *Red* = *Roudouz* emaoomp o paouez studiañ. Un anv gwregel e vefe eta emañ ? Neuze e c'hellomp treiñ *Pont an Teir Roudouz*. Ma l bez' ez eus eno *teir stêrig* o kejañ eno. Adalek o c'hember eo e ro tud ar c'hornad an anv a *Leri* (*Lery*) d'ar stêr krouet gant an teir stêrig. Ar c'hartennoù evel just, a glask uheloc'h mammenñ al Leri, met se 'zo un afer all.

Bremañ e c'hellomp resisaat ster klok ar ger *Red*. *Red* o talvezout da gentañ : *Roudouz* ha neuze *gwazh-dour* bas an dour enni. Amañ e Pont-Terret, ez eo anat ne oa nemet ur *Roudouz*, e gwirionez, dres e kember an teir stêrig-vihan, nebeut a zonder dezho. Uheloc'h hon eus kavet *Teiryd*, e kembraeg ; hogen kaeroc'h a zo : e Llanfairfechan, e Kembre, e kaver *Pontyairyd*, da lavarout eo *Pont (an) teirred* : Pont-Terret. Diaes e vefe kaout gwelloc'h. Neuze e c'hellomp resisaat ster an daou c'her *Red* ha *Roudouz*, o-daou o talvezout da gentañ *roudouz*, hag o kaout un eil ster, *gwazh-dour* nebeut a zonder dezhi.

Bez' ez eus e Bro-Blouvael an anv iskis-tre, anv

un atant nepell diouzh kêriadenn Kerien⁽¹⁾, nemet emañ war zouar parrez ar Voudenn⁽²⁾, war ribl forest bras Loudieg : *Beurlouvach* (skrivet *Beurlouvache*) a vez graet eus an atant-se ha distaget e vez *Beurlouvach* ha *Beurlouvach*. Ne din ket da gontañ deoc'h penaos e vez diskleriet an anv-se gant ar bobl, peogwir e reont ur c'hoari-gerioù e romaneg ! Ar gwellañ d'ober ez eo mont da welout evit esae kompren, ne gav ket deoc'h ? Ouzh tor an dorgenn emañ an atant. Eus ar forest nesañ e tiskenn ur wazh-dour a dremen tre e-kichen an atant hag a ya d'en em deurel ouzh troad an dorgenn e stêrig Kerien ; ar Forest a vez graet eus ar wazhig-se... Met ur gleuzenn a zo eno ouzh tor an dorgenn ha drezi e tiskenn an dour, ur gleuzenn hañval ouzh ur stenk hanter-disec'het, ha ne vefe nemet stankañ ouzh an dour d'ober ul lennig vras ; ha bez' ez eus bet eno sur-mat, ul lennig ur wech bennak

ha ne vefe ket diriskl tostaat re war an douar gwak ha gleb. Marteze ez oc'h gouest bremañ da zivinout ster anv al lec'h ?

Bre-louc'h-vas, deuet da vezañ hep diaester ebet *Berlouvas* ha *Berlouvach*. Ar ger *vas* (*bas*) a zo diaes a-walc'h da ziskleriañ, met *Berlouc'h* a gaver, da skouer, e Langidig. *Louc'h* a zo gwregel ha setu perak e kaver ar c'hemmadur *b-v*.

Evel m'hor boa ken prouet evit *Langastrea*, e kaver ar ger *Bre*, el lodenn divrezhonekaet eus Breizh.

Neuze emañ :
 Torgenn al louc'h (*al Iarnn*) dizon (*pe izel*).

NOTENNOU

1 Kerien, e parrez Lannberennez (*La Prénnessaye*).
 2 Ar Voudenn (*La Motte*).

Soaz an Tieg

KEGINEREZH

KIG-SALL PE KIG-MORZHED GANT JISTR

Dre zen eo ret kaout : Un tamm kig-sall
 pe kig-morzhed
 Un aval da boazhat
 Un delienn lore
 Rezin sec'h
 Jistr

Lakaat an tammou avaloù troc'het, ar rezin hag an delioù-lore en ur plad plad. Lakaat an tammou kig-sall troc'het fin war an avaloù. Goloñ gant jistr. Lakaat da viriñ goustad war rizenn uhelañ ar forn hag ar plad goloet gant ur follenn alumiñ ha gortoz ken na vo poazh.

Tennañ ar c'hig ha servijiñ gant patatez ha karotez.

Teurel kuit an delioù lore.
 Malañ ar pezh a chom evit ober saos (an avaloù, ar rezin hag ivez ar sug).

(*doare-keginah deuet eus a Vreizh-Veur*.)

SOUBENN AN AMANN ROUS

Ur guc'hennig ognon hoc'h eus. Kemerit ur penn bennak. Drailhit anezho, o lakait war an tan da rouzañ en un tamm amann pe en un tamm bloneg. Un nebeudig bleud a lakait goude gant ur barine dour d'o c'hemmeskañ. A-raok teurel ar

KOUIGNENN ALL GANT AVALOU

Kemerit : 6 aval mat
 4 loaiad vlead
 3 loaiad sukr
 2 vi
 ur banne laezh

Grit gant an traoù-se ur yod tanav ; kignit an avaloù ; lamit ar greizenn diouto ha grit tammou tanav ganto ; kammeskrit an holl draoù asambles. Lakait neuze, ul loaiad amann teuzet da dommañ en ur gastolodenn, ha taolit e-barzh ar pezh a zo er bodez hep o c'hemmeskañ an dro-mañ. Gant ur banne kognag e-touez a vez gwelloc'h ar gouign.

Lakait war an tan da boazhat en ur lakaat ivez un tamm tan war gorre (er forn, na petra 'ta !) ha pe vezo poazh hen debrot ez-tomm.

Lazig.

Twin Anna.

R. Kermene

BOTOU-LER AN DEN MARV

(Kontadenn Gouel an Hollsent)

E gwezh ar rabin treuzet gant an alez vras a stage ti noblañs kozh Breil Hamon ouzh hent bras Kergaza-Koedinez, e rae ar glav hag an avel trouz da vat. Da bep mare e kouezhe pogou-kistin eus rouestladeg ar brankoù, en ur stokañ ouzh an douar e figorent hag e lezent d'en em stlabezañ amañ hag ahont e geot mouest ar gwimennoù, er poulladoù fank pe war ar vein gwalc'het-mat eus leurenn an hent, ar pezhioù kistin gell bet dalc'het kloz enno betek neuze. Gant barrioù glav dibenn miz Here e oa en em silet dour dre-holl : eus a-bell e welod roudennadoù anezhañ a-dreuz ar pradoù ; karget e oa bet a-hed an hentoù, an touflezioù ; bez' e oa ivez e kement toull lezet gant treid al loened, e pri ar gwenodennoù hag an hentoù-kirri.

En ur errouet e penn an alez vras, ec'h en em gavas Brieg Aodren dirak ur vogerenn vein louet, toullt enni un nor-dal war hanter-gelc'h kosteziet a-gleiz gant un nor vihan wareget lec'h ma tivilhe brankoù iliaz kammigellek. Reñ a reas an den un taol-bount d'an nor-gostez hag ec'h antreas er porzh. Neuze, en ur lakaat e votoukpad da drouzal war ar pavez maen-benerezh da reñ da c'houzout moarvat edo o tont, e skoas etrezek dor ar gegin, rak dre eno ec'h antree d'arremprederien voutin an ti. D'ar mare-se ne veze ket skoet war zor ar maner, P'edo o vont da vaskañ gant e viz-meur war al likedenn-houarn kev, e chomas Brieg Aodren en arvar ur momedig he neuze, o trec'hiñ warnañ e-unan, e vountas war an nor hag ec'h antreas. Daoulinet war vein an oaled, ur vaouez peuzwenn he blev, dalc'het gant ur rouedig stardet gant ur ruban voulouz ledan, adalek he zal betek kil he fenn, a oa o c'hwezhañ war an tan dindan ur potouarn e-pign ouzh an drezenn-bod. Treñ a eure he fenn etrezek an hini a oa o tegouezhout ; neuze ez eas en he sav hag e youc'has gant ur vouezh saoullet, he daouarn ganti war he divleiz. «Ma ! Ret e oa deoc'h kaout ur c'hoant du d'hor gwelout, Brieg, evit mont er-maez gant an avelaj-gouest da zigornañ saout ! Dont eus Penn-ar-Vouilhenn da Vreil-Hamon gant un amzer evel-se !» Goude bezañ preñnet an nor war e lerc'h, e oa tостаet an den d'an oaled ; lemel a reas e dog diwar e benn hag e respontas, nec'het an tamm anezhañ :

«— N'eo ket c'hoazh an hent a zo d'obar ; n'eus ket ouzhpenn un hanter-lev. Ha neuze, me 'soñje

deoc'h eus an amzer o vont d'en em zresañ ; met tremen a ra an amzer, emañ an oaled d'paouez seniñ dek eur, ha ne dav ket an avel, gwazh-a-se ! Pa vez ret e vez ret ! Arabat deoc'h an em zirekañ, Stinet, ezhomm am befe da gomz ouzh ar mestr yaouank. Ar vatezh a zeuas un-huanad ganti. Ar mestr yaouank, setu an anv a rae ar vberien eus an Aotrou Yann Tual, an disped d'e 48 vloaz, evit hen dishevelout diouzh e dad a veze graet anezhañ «ar mestr», berr-he-berr ; met abaoe ar beurevezh-se eus ar miz tremenet hag en devoa gwelet an den kozh 70 vloaz o vervel, ne oa mui nemet ur mestr e Breil-Hamon ! Met ar c'hiz, an akustumañs, 'vel 'ouzoc'h...

«— Fellout a ra deoc'h eta gwelout hon Aotrou ? N'emañ ket pell. Me 'zo o vont da lavarout dezhañ emañ aze.» Stinet a zigoras un nor hag a yeas diwar-wel. Prestik e oa distro :

«— Deuit, emezi d'ar peizant, «Emañ an Aotrou oc'h ober kartouchennoù evit mont da chaseal, met lavaret en deus din e c'hellfec'h komz outañ, evel ma kerot, tra ma talc'ho e-unan da labourat.»

Ur vunutenn bennak goude e voe graet da Vrieg Aodren antren en ur pezh teñval e-lec'h emedo perc'henn Breil-Hamon en e goaez ouzh ur burv ledan o renkañ gant urzh dirazañ douilhennoù glas ha ruz ha sac'hadigoù drajez-plom.

«— Tapit ar gador-se, Aodren, ha kontit din petra 'zo kaoz ec'h oc'h deuet amañ. N'eo ket bet an tan en atant du-se da vihanañ ?

— O, nann ! Mestr. Diwall mat a reer diouzh an tan ; an holl du-mañ o deus kement a zoan dioutañ.

— Neuze ?

— N'eo ket aes da lavarout.

— N'eo ket aes da lavarout ? Ma ! Aodren, c'hwi a anavez ac'hanon. Gout a ouzoc'h ne don ket sac'h-an-diaoul koulskoude ! Petra 'zo 'ta ?

— Eus an Aotrou kozh eo e karten komz.

— Eus va zad ?

— Ya, eus an Aotrou kozh.

— Ma ! Un tamm douetañs am eus... C'hwi 'zo o vont da lavarout en devoa va zad asantet krennañ diwar ho kouel-Mikael, pe en devoa prometet dresañ al lojeiz... 'Benn ar fin, lavarit sklaer.

— Nann, n'eo ket se, met nann, tamm ebet.

— Ma ! Neuze, petra eo ?

Sioul e chomas an traoù e-pad ur pennadig hirik. Spontet, an Aotrou Tual a savas en e sav hag o treiñ etrezek e gendivizer :

«— Brieg, va Brieg kaezh, emezañ, c'hwi a zo aet disliv, dismeiet... Petra hoc'h eus eta da lavarout din ?

— Ar mestr a zeu en-dro !

— Dont a ra en-dro ?

— Ya !

— Ha pelec'h e teu en-dro ?

— E penn-traoù prad Kintrann.

— Hen gwelet hoc'h eus ?

— Ya, div wech. Ar wech kentañ, tri devezh 'zo abaoe — e vales 'hed hanter-kant kammed bennak em raok. Pa'z eo en em gavet gant ar saprenn vras en tu dehou d'an toull-karr, n'em eus ket hen gwelet ken : evel pa vefe antreet e korf ar-wezenn... Diouzh an noz em eus kontet kement-se d'am gwreg. Lavaret he deus din : Un dra ac'h eus ankouaet : goulenn digantañ petra a venne. Ar re varv ne gomzont gwech ebet da gentañ. Dit-te eo digeriñ ar gaoz... Setu endeeun petra am boa graet dec'h ?

— Hen adgwelet ho pos dec'h ?

— Ya, da serr-noz, en hevelep lec'h. Edo o vont adarre etrezek toull-karr ar saprenn vras p'am boa kriet dezhañ : Mestr ! Arabat deoc'h mont kuit evel-se, hep lavarout din petra a glasket dre amañ.

— Ha respontet en devoa ?

— Distroet e oa bet ouzhin. Trist e oa. Gant e zorn en devoa graet sin din da dostaat betek ribl ar wazh-dour a dremen eno, met nann hiroc'h.

War-hed pemp pe c'hwec'h kammed edon dioutañ. Pedennoù eo a fell deoc'h ? am boa goulennet. Hejet en devoa e benn da lavarout nann. Neuze em boa adgoulennet digantañ :

Lavarit din petra a vank din ober evit ho sikour. Komzet en devoa gant ur vouezh dimerzh, ha koulskoude n'em boa ket kollet ur ger, nann hini ebet...

— Petra 'ta en devoa lavaret ?

— Lavaret en devoa din en devoa, pell hag amzer 'zo, prometet mont war-droad da bardonañ da Itron Varia an Drein, da Josilin, ha n'an devoa ket gallet sevenñ ar gouestl-se, hag e c'houlenne diganin-me va-unan ha neket digant un all, hen ober.

— C'hwi ?

— Ya, me ! Hag e kendalc'has : Te 'gemero va botou-lêr ponner, ar re am boa prenet e foar Sant-Uned e miz Ebrel. Botou-lêr mat, ha n'am boa ket gwisket koulz lavarout, hag a yelo da fall a-barzh nemeur. Dindan armel an trepas bras emaint, an armel a lakaen enni va binviou-jardinerezh. Ret e vo dit kemer ur gwenneg bennak ivez evit an dispignou war an hent, hag evit reiñ ur prof da liiz Josilin. Te 'lavaro kement-

se da Yann. Setu holl... Sell ouzh da dreid bremañ... Kerket em boa sellet d'an traoù : ur pezh aspig du a oa o tremen etre va zreid. Me 'm boa graet ul lamm, seurt-se ! Met p'am boa sellet dirazon goude, n'edo ket mui ho tad eno.»

An Aotrou Tual a zalc'he da weañ e vourroù hir damc'hlas, hag a seblante bezañ o prederiñ.

«— Gortozit ac'hanon, emezañ erfin. Hag ez eas er-maez.

«Aet eo da gontañ pep tra d'ar vatezh, eme ar merrour outañ e-unan. Gwir e oa. Yann Tual a oa unan eus ar speredoù-se, hedro, cheñch-dicheñch, bepred divarrek d'ober o soñj ; ar si-se end-eeun en devoa harzet outañ da zimaziñ. Chomet e oa bet da vevañ gant e dad, manet intañv abred, ha gant ar vatezh-se, pemzek vloaz koshoc'h egetañ hag a zalc'he-ñ d'ober «matezh» anezhi evel ma oa bet desket dezhañ hen ober, pa oa en oad a c'hwec'h vloaz. Abaoe ma oa marv ar mestr kozh, e klaske perc'henn Breil-Hamon repu aliesoc'h-aliesañ dindan askel e vatezh. E ti kozh an Dualed ez eo-hi bremañ eo a zivize pep tra.

A-benn un dek munutenn bennak, e teuas an Aotrou Yann war e giz. War e lerc'h e teus Stinet. Homañ eo a gomzas :

«— Aodren ! N'hoc'h eus ket a vezh ? Ur vicher vray a rit !

— Pesurt micher ?

— Ar vicher a filouter, a laer, pa rankan lavarout ! Ya ! Botou ar Mestr a zo evit gwir, an trepas bras. C'hwi ho pos gallet o gwelout, Aodren, koulz hag an tri douger all, pa oac'h aet da gerc'hat arched ar Mestr (Doue d'e bardono !)

da gambre sav-heol. Me eo am boa o renket dindan ar pres. Met n'int ket evit ho treid, eus nan int ! Meritout a rafec'h...

— Meritout a rafan petra ?

— Ac'hanta, ya ! Meritout a rafec'h e vefe kerc'het an archerien war ho tro.

— O ! 'velkent !» a enebas gwan a-walc'h an Aotrou Tual.

Sevel a reas ar merrour en e sav ; chomet e oa difrom-kaer ha sirius. Hep ober van ouzh diakred dismagafus ar vatezh, e c'houlennas gant ur vouezh ferv :

«— Neuze e kemerit warnoc'h lazel an hini tremenet di lec'h m'eo aet ?

Ouzh ar mestr evel just, e sille ar goulenn, met ar vatezh eo a respontas adarre :

«— Ya, ya !», emezi war un ton kasornus ha goapaus. «Ma 'gemero se war e c'hont, ha dinez-h-kaer ez om ; ne zeuio ket an hini merv, en noz, da sachañ war va zreid.»

Aodren e depas an nor hag a yeas kuit, goude bezañ graet gant e zorn ur salud amparfal.

War-dro serr-nnoz e sioulaas ar gorventenn. Pa savas an heol antronoz, e voe gwelet o ruzañ a-us d'ar parkeier ul latur tev damwenn, na oa ket teñval a-walc'h evelkent evit beuziñ ar gwez hag ar brouskoadoù — diougan ur spanaenn wirion.

Abred e tebras an Aotrou Tual e zijuniñ. Ne oa ket c'hoazh sonet kreisteiz p'edo gant e fuzuilh a-dreuz e skoaz o vont dreist treuzoù an nor-dal, tra ma klaske sioulaat e gi based hag e gi spagnol dirollet-naet, en ur zerc'hel da huchal warno ha da c'hwitellat...

P'he devoe leket pep tra en e blas er gegin hag er sal-debrñ, e lavaras ar vatezh outi hec'h-unan e vefe un dra vat tapout botoù-lêr an hini marv hag o degas d'ar gegin e-lec'h ma vefent en ur plas sec'hoc'h.

«Pell hag amzer 'zo e oa dileet din bezañ o roet d'am breur-kaer», emezi a-vouezh-uhel. «Me 'gav din ne vint ket re vras dioutañ. Disul e rin lavarout dezhañ dont d'o esae. Pec'hed e vefe o lezel da louedif.»

An trepas a ranne en daou, en e hed, an ti ledan-se, bet echuet a 1664, hervez ar bloaz merket gant ar vasonerien ouzh korn unan eus ar siminaloù. War an diaraog edo ar pezhioù annezet; war an tu diadrefn edo ar waskerell, ar c'hav, kamb ar frouezh, ar forn gant ar volz anezhi kouezhet en he foull pell amzer a oa. E penn an trepas, diouzh tu ar sav-heol, e oa un nor hag a skoe war ar jardin. Dre werennou krec'h an nor e teue un tamm gouloù, met nann trawalc'h evit skubañ kuit an efed a gañv a save eus an trepas-se hir-hir ha ledan a oa toulllet er mogerioù hed-ha-hed anezhañ dorjoù dihegar a vire warno restajoù livaj glas-gwer dilufr. War an tu-se, daou pe dri metr diouzh an nor edo an armel 'lec'h ma oad boas da gienkañ ar binvioù-jardinat munut; ar botoù-lêr a weled eno gant o begoù bountet dindan bord ar pezh-arrebeuri. Stinet a dapas krog eno hag a savas, met kerent e lezas anezhañ da gouezhañ en ur lezel ur griadenn a spont : «Oc'holla !»

Ur pezh naer liv teñval a dec'has eus unan eus ar botoù-lêr. Hep hastañ, evel pa vije sur ne c'helle den ebet nozout outi, en ur ruzañ war al feur-bri, gant un drouz euzhik, he c'horf c'hwetzh-spontus, ec'h en em stlejas etrezek ar sklerijenn a zeue eus an nor. Ur wech war an treuzoù e tastonas ar bord en ur vrasellat a-gleiz hag a-zehoù he fenn tric'hornek runkonus, ha neuze goude bezañ kavet ur plas 'lec'h ma oa uzet ar maen, e talc'has gant he hent en ur c'hwitellat gant ar biljadur. Dambrest ne weled mui nemet bag he lost o tremen dindan an nor debret diouzh traoñ gant an uz, ar glav ha dent ar razhed. Tec'hout a eure Stinet en ur lavarout : «— Va Doue ! Ar geou a oa ganin ! Gwashat kammed

c'houllo am eus graet ! Sur-mat ez eo honnezh naer-aspig prad Kintrann.

War-dro peder eur e oa deuet an amzer da vezañ du, ha trouz glav gantañ. Gant aon na zistrofe an tempest, ne zaleas ket an Aotrou Tual pelloc'h e gwaremou Breil-Hamon... Goude bezañ taolet war an daol e sac'h-jiboez a weled ennañ ur c'honik hag ur c'hefeleg, edo o vont, evel bep noz, da azezañ dirak tãn an oaled, evit dilemel e heuzoù, pa lavaras ar vatezh dezhañ war un ton a guzul hag a c'hiac'har :

«— Peogwir ne deo ket teñval c'hoazh, e tlefec'h mont betek Penn-ar-Vouilhenn, hag e kasfec'h ganeoc'h ar botoù-lêr en deus kement a c'hoant da gaout.

— Penaos ? Dec'h ho poa...

— Ya, gout a ouzon, met hiziv em eus bet soñjet e kement-se. Mar deo gwir emañ er boan hon hini tremenet... Ne fell ket din-me memes tra bezañ daonet. Un dra hag a sell ouzh ho tad an hini eo... Kit 'ta d'o zapout; emaint el lec'h ma ouzoc'h... O direnket em eus zoken un tamm goude kreisteiz.»

Yann Tual, gant ur sentidigezh dreist-ordinal, a yeas da gerc'hat ar botoù-lêr hag a grogas d'o fakañ gant journalioù kozh. E-pad m'edo oc'h amariñ ar pakad gant fiseleñ dev, e lavaras c'hoazh Stinet :

«— Daoust ha n'en devoa ket komzet ivez eus goulenn un tamm moneiz diganeoc'h ? Ne vefe ket ober goap anezhañ ma vefe roet dezhañ ul loeiz 20 lur.»

An Aotrou Tual ne oa ket an arc'hant-se gantañ; sentus bepred ez eas d'o c'hemer e tiretenn e vurev. Pa zigoras an nor da vont er-maez, e teuas ur barr-avel da lakaat ar gwiblennoù da wigourat war an toennou, hag e teuas glavlennoù ledan d'em flastrañ war bavez ar porzh.

«— Ma !» a c'hrozolas ar c'hozh paotr yaouank «setu glav bremañ.» Hag e chomas a-sav war an treuzoù ouzh en em c'houlenn hag-eñ ne vefe ket koulz gantañ gortoz betek an deiz war-lerc'h. Mouezh aatronius Stinet avat, hen tennas eus e nec'hamant : «Ho mantell glav kaoutchoug a zo aze e-pign ! Sellit : e-kichen aorolaj emañ.»

An Aotrou Tual a daolas ar vantell ledan war e gein hag a savas ar c'hougoul anezhi dreist e benn. Stinet a santas he sperad disammet p'hen gwelas o tremen dindan wareg iliavek an norig-kostez, e chouk pleget gantañ war-raok, evit stourm ouzh ar barr-glav hag ouzh an avel walarn a lakae koad sec'h da gouezhañ eus kistinenned meur ar rabin.

(Bet embannet war La Bretagne à Paris 30.X.1937 — brezhoneg gant Klerg).

LEVRIOU NEVEZ

STEN KIDNA : Kanenn d'ar vuhez. Kentskrid gant Langleiz. 72 paj. Priz : 8,00 L; K.R.P. Sten Kidna 591.83 N Naoned.

Ul levr barzhoniezh ez eo **Kanenn d'ar Vuhez**, savet gant ar skrivagner gwenedat, Sten Kidna, skolaer en Alre. Neb a lenn al levr a welo dispak dirak e zaoulagad ene ar skrivagner gant e soñjoù e uhelennadoù, rak en em lakaet eo en e varzhonegoù. Div lodenn a zo el levr : Al lodenn gentañ he deus an titl : *Pa d'rid ar galan*. Karantez ar skrivagner evit ar vuhez, evit kement tra krouet a zo a gaver el lodenn-se :

*Sistr Branto, gwin Anjou, bier München
He souehenn Rosporden
Mouezh skidint Andrea Gouilh, minc'hoerzh
glan Ivona Martin*

*Lenn-veur Anney
pe hor Mor-bihan-ni*

E garantez evit e bried (*Hymen*), evit e yezh dindan istor Minouraz Keramil bet distroet diouzh ha bro ha diouzh he yezh gant ar skol hag aet da Bariz. E garantez (amourested) gant merc'hed, h.a.

En eil lodenn, dindan an titl : *Labour ha Stourm*, e weler mesk-ha-mesk soñjoù politikel Sten Kidna, e gasoni ouzh ar brezel (*Biafra*), e druez ouzh labourerien an uzinoù o vont bemdeiz d'o labour d'ar memes koulz, gant un tamm ehan bennak bep dek vloaz da vont d'ar brezel. Istor uzin Lokrist (govelioù an Henbont), goaperezh kriz hag ur youc'hadenn ouez a-enep an dislealded; evel litanioù e tibun roll an tordedoù graet a-enep d'ar bobl vreizhat. N'emañ ket avat o klask ober abostolerezh, nemet diskargañ gant komzoù krenn ha lemm e galonad evel ma tere ouzh ur barzh.

E gwirionez, e vefe bet dispar ul lodenn vat eus barzhonegoù al levr evel kanaoennou stourm, mar befent aezet diouzh se, ha laket muzik diouzh se warno, nemet e vefe bet diaes-tro moarvat dastum e gwerzennoù fetis ha skoüs menozioù an oberour.

Eus Bro-Wened eo Sten Kidna ha n'emañ ket o klask hen kuzhat (ha perak e rafe ?). «E lavar hen diskuilh, n'eus forzh penaos. Pell hag amzer 'zo en deus komprenet e ranker unaniñ ar yezh ar muiañ ar gwellañ, met ne fell ket dezhañ, ha gant gwir abeg, treiñ kein d'e rannyezhezh c'hendik. Met dre zievezhed moarvat en deus lezet meur a c'har en o stumm gwenedek evel *krezieu e-lec'h kroezioù*. Un nebeudig fazioù e-keñver yezh a gaver, evel da skouer, paj. 18 : *va c'hlanded*

e-lec'h *va glanded*; paj. 23 : *laosket d'an heol e-lec'h losket d'an heol*; paj. 48, *ez omp evit ez eomp (ec'h amp, e gwenedeg)*.

Ar mouler avat, ne seblant ket bezañ boas da embann skridoù brezhoneg, rak un toullad brav a viou-koukou a zo chomet war e lerc'h; bravañ hini a gaver paj. 33 : *hiziv e-lec'h hiziv*.

Klerg.

Loeiz HERRIEU : Kamdro en Ankoù. Priz al levr : 45,00. Skrivañ da M. Hennio K.R.P. 161766 Naoned.

Ur bern vad a zo bet lavaret diwar-benn **Kamdro en Ankoù**. E dalvoudégezh : un testeni eo, un testeni war vuhez spontus ar brezel 14-18, testeni un den n'en doa ket goulet zoken kemer ar permissionoù en devoz droed da gaout hag a zo chomet pevar bloaz hanter hep adgwelout e familh. Sur-mat n'eo ket stank ar soudarded o doa graet kement all ha setu perak e verite L. Herriou ur gopr kaer : e draoù distrujet gant Paotred ar Stourmerezeh kuzh, e 1944, hag eñ darbet dezhañ bezañ fuzuilhet, mar n'en dije ket bet amzer da dec'hel...

Talvoudégezh al levr : ennañ e kaver ur rannyezhezh ha n'eo ket bet studiet kement hag ar rannyezhoù all, gant gerioù enni dizanav er c'hornaodoù all.

Un dra a vank el levr : ur gartenn o verkañ dra belec'h e oa tremenet L. Herriou; bez' ez eus tud hag o deus prenet kartennoù Michalin evit heuliañ gwelloc'h ar skrivagner eus an eil bourc'h d'eben, eus an eil korn-bro d'egile. Bevoc'h e teu da vezañ an danevell er stumpe-se, evel just.

Bez' ez eus un dra all ha n'eo ket displeget kaer : penaos en doa an oberour implijet an notennou skrivet gantañ an eil deiz war-lerc'h egile : o adskribañ evel ma oant bet gantañ, pe ober un tamm kribat dezho ?

Danvez al levr : ur serjant-fourier karget da bourchas lojeiz ha bitailh d'e gompagnunezh o komz diwar-benn kement a wel, kement a glev, nemet evel just, e teu alies gantañ kaoz ar boued hag al lojadurezh. Ret eo bezañ gwall-ampart evit dec'hel da zedennañ evezh al lemm hep e skuizhañ gant danevelloù evel-se. Emañ bremañ ar gelaouenn okitanek *La Gai Saber* (1974) oc'h embann notennou ar Chaioni Salvat e-keñver ar brezel diwezhañ; kudennoù pouezus evit ur prizoniad : boued, lojeiz, dilhad a zeu da vezañ

tamm pe damm arabadus. Pennadoù kaer a gaver e levr L. Herriou, lakomp e weladenn da iliz-veur Reims goude ma oa bet distrujet gant ar bobuzoù ar C'hermaned. Ar gwellañ d'ober marteze e vefe lenn *Kamdro en Ankeu* a dammoù en ur studiañ pizh ar yezh.

Mat-tre o deus graet an embannerien o virout doare-skrivañ an oberour. Lavarout a raio darn — evel ma'z eus bet graet dija — ez eo diaesoc'h lenn ar yezh-se en askont d'he gwiskamant «gwenedat». Me 'gav din koulskoude e oa ar gwellañ lezel evel ma oa skrid an hini moarvat en deus anavezet ar gwellañ biskoazh yezh Bro-Wened : rak peseurt skritur da gemer ? Ober neuze evel ma ra Sten Kidna pe Langleiz, met ar re-mañ a sav o skridoù er yezh peurunvan, ha soñjit 'ta gwashañ pezh labour e vefe bet ad-skrivañ al levr penn-da-benn !

Hon meuleudi da Vab L. Herriou evit ar boan en deus kemeret, hag esperomp e teuo er-maez hep re a zale an oberennoù all.

Klerg.

Kanaouennoù nevez a Vro-Dreger, embannadurioù Breiz.

Ar c'homzoù diwar bluenn skrivagnerien a Vro-Dreger, Anjela Duval, Maria Prad, Evnig Penn-ar-C'hoad, Yann Derrien, E. Teurnier, F. Danno ; he-mañ en deus savet an darn vuiañ eus an tonioù. Tud all evel Koulouarn pe P.M. Mevel ha ne dint ket a Vro-Dreger a zo bet amprestet ur ganaouenn bennak diganto. An doare-skrivañ implijet, daoust ma'z eo mesket, en deus en dro-mañ un tamm liv kristen ha kalz aesoc'h ez eo ar c'homzoù da lenn. Ul levr a dalvoudegezh. Gourc'hemennoù da F. Danno, pennurzhier an danvez. Goulenn al levr e ti ar varc'hadourien-levrioù.

Klerg.

Ivona Galbrun

KOROLLOU BREIZH

(Eftvorennoù hag evezhiadennoù)

Bez' ez eus kalz a dud, dreist-holl re yaouank hag a zo dadennet gant kement tra a sell ouzh **Korolloù Breizh** ; setu perak e fell din komz anezho en ur glask enno o ster arouezel, penaos ez ont deuet va-unan d'o anavezout, ha diskouez neuze penaos e tleer o dafsal.

Orin ar c'horoll ? Merkomp diouzhtu an danvez lidel a zo er c'horolloù-pobl. Lakaat ar c'horf a-bezh da gemer e lod en azeulerezh en deus mab-tien c'hoant da gas etrezek an Nerzh-dreist, etrezek Mestr ar Bed : Doue. Evit ar pobloù kentañ e oa an Heol ur skeudenn eus Doue, hag a-wechoù zoken ar gwir Doue. Evit en em lakaat a-du gantañ, hag ivez evit hen lakaat a-du gant mab-den, evit e drugarekaat ha gervel e zonezoù war ar bed eo e veze savet dañsoù o vevj, war an douar, da heul hent an Heol en oabl. Met komzomp hepken eus an Dafs o treiñ dalc'hat war an tu kleiz. Miret eo bet ar reolenn-se ; meneget eo e skridoù eus ar pemzekvet kantved o komz eus korolloù pobl Breizh. «Etrezek an tu kleiz eo e vez kaset ar paziou evel ma seblant an Heol (en hor broioù-ni, da vihanañ) mont dre an oabl a-us d'an douar — heñvel ivez ouzh kerzh nadozioù un eurier.» Resisat eo ivez ez a *reizh taol* d'ober ur rann-goroll klok — hag e vezo ad-c'hraet ar rannoù ken afies gwec'h ha ma vez c'hoant lakaat da badout ar c'hrogad-koroll, hag ar sonerezh — kanañ pe mouezh ar binvioù — a ya da heul. Eeun-tre eo ar frazenn-sonerezh er skrid kozh, dre ma'z eo roet moarvat evel ur seurt diazez, ur steuenn-skouer. Skridoù all, dres, a gomz eus rouestlad ar paziou, eus lies-doare al lusk, eus an hent troidellet treset war al levr gant ar c'horoll — o sentiñ bepred ouzh ar ventad a eizh taol hag ouzh ar c'herzhed etrezek an tu kleiz. Setu amañ an anvioù roet d'ar c'horolloù hag a vez kavet er skridoù kozh : *Brank, passepiéd, bal, tro, jabado, trihor*. Darn eus ar gerioù-se a zo gallek, ha dre-se en em c'houlenner ha poblek ez int, pe ez eo an danevell er deufe kemeret anezho en e yezh kement ha dishañvalout an eil diouzh eben ar

c'hoarioù-koroll en deus gwelet. Pe c'hoazh an Aotronez o 'n em veskañ gant tud ar bobl evit abadennoù hag a vire c'hoazh d'ar c'houlz-se o arouezezh lidek, o deufe ijinet an anvioù-se ? An holl a oar petra a skrive ar Varkizez a Savigne a-zivout an doareoù kaer da zafsal a oa gant an Aotronez a Lokmaria ha Koedlogon gant div Vreizhadez : *passepiéd* ha *menuet* eo an anvioù implijet gant ar skrivagnerez diwar ar re a ana-veze evit an dañsoù graet «el Lez», ha na dalvezont ket a-bell, emezi, pizh he deus gwelet « Gwitreg.

Penaos eo bet degemeret an anv-se : *passepiéd*, e Breizh-Izel ; se a zo da c'houzout, nemet em eus soñj eus gerioù ur ganaouenn da zafsal :

Pachepie Kalfag, pachepie plén

An hini 'ray 'neañ (anezhañ) 'ranko bezañ den. A-raok kenderc'hel gant kudennoù anvioù an dañsoù, hag a-raok komz eus «gwirionded» an dañsoù-se deuet betek ennomp a rumm da rumm, ez an da gontañ da gentañ penaos em eus o anavezet.

D'ar c'houlz-se, ne oa ket ar bruderezh a zo bremañ en-dro da c'hizioù pep korn-bro. Glanoc'h a-se e oa chomet an danvez. E-doug ar marevezh a-raok ar brazal pevarek (1914) e oa hag e Pariz — ya — ha ma c'hoazh plac'hig vihan. D'ar c'houlz-se — a ouzoc'h — e oa e-leiz a Vretoned o devoa ranket mont da labourat pell diouzh o bro. Amañ e vevant paour a-walc'h, tiegezhioù niverus o bugale, war o zacherinoù labour-douar bihan a-walc'h. Pa zleue ar baotred hag ar merc'hed yaouank en o oad, ne oa ket a labour evita. Da Bariz — ha tro-war-dro eta, e tuzent niverus. Eho en em adkavent hag en em zarampredent. N'o doa evel lojeiz, peurliesañ, nemet taronoù kambroù bihan ha divalav dindan doannoù tiez o mistri. Ha neuze ez eo an ostalerioù dalc'het ken kenvez, en em gavent d'ar sul goude kreisteiz (en-dro da v-«Montparnasse» pe ar «Batignolles» dreist-holl). En unan anezho — er rù Vandamme, evit ar re a c'hell marteze anavezout al lec'h, diamantrout hogos holl bremañ, a gredan, gant tachenn

Bep daou viz lennit AL LIAMM

(savet e 1946)

ar gelaouenn nemeti o reiñ, c'hwec'h gwec'h ar bloaz, barzhonegoù, pennadoù a bep seurt ha keleier. 80 pajenn e pep niverenn.

Reher : *Ronan Huon*

Koumanant : 30 lur. Studierien : 25 lur. Mme S. Chereil, 109, bd de Verdun, Roazhon. C.C.P. 2184-34 Rennes

EMBANNADURIOU AL LIAMM

Nevez deut er-maez :
TANGI MAL MANCHE

GWREG AN TOER Marvailh an Ene Naonek

Deou bezh-c'hoari, 84 pajenn ment bras
War Johannot niverennet : 15 lur.
War baper all : 12 lur.

ROPARZ HEMON NEN JANI

ROMANT 268 pajenn
War Verge niverennet : 30 lur.
War baper all : 23 lur.

ROPARZ HEMON

Geriadur brezhonek-gallek

1268 pajenn, koublet asambles, paper simill-bibl
golo plastik ruz. Priz : 42 lur.
Mlle J. Queillé, 47, rue Notre-Dame, Guingamp.
C.C.P. 1136-82 Rennes.

LEVRIOU BREZHONEK

Levrioù brezhonek kozhanevaz a c'heller prenañ
e ti Giraudon 30, strada Keraimpont
Lannuon Pellgomz 35.04.90

nevez ar gar Montparnasse. En ti-ostaleri-se e oa tremenet va zud ur wech bennak, evit gwelout mignoned Breizhiz. Deuet ur mare, e voe savet un dro *Laride* (soñj am eus eus an anv resis) en ur ganañ evel just ; ar vugale a oa eno a voe lakaet da vont ivez, en ur c'helc'hig e-kreiz hini an dud vras. Ur paotrig a oa krog em dorn hag a gase ac'hanon en ur lavarout — e galleg — «Djwallit ouz ha c'havalieriez», rak ne oa ket frank al lec'h. Hag e-touez an danserien vras e oa ur pikol soudard, tokarn lufus gant ul lost blevennek dezhañ, heuzoù ponner gant kentrou, hag ur pezh sabrenn a-istribilh ouzh e gostez (ur «c'huraser» pe un «dragon» bennak eus ar c'houlz-se) a zeue a-fies da stokañ ouzhimp-ni, er c'hreiz. Evel just, n'eo ket neuze em eus desket koroll *Laride*, nemet an tañva kentañ-se n'am eus ket ankouet !

Un dro all bennak e oamp en em gavet e ti kerent Breizhiz, e Gagny (bannlev Pariz), hag eno e oa o tremen, deuet da welout o zud, paotred eus Kallag en em lakas da ganañ e-giz kan-ha-diskan. Ar vugale all — a oa en ur c'horn bennak pe en ur gambir all o c'hoari, nemedon-me a oa chomet evel strobinelet o selou ar ganerien. Garanet eo em efhor an ton a oa gante (notennet em eus anezhañ em levr *Koroll Breizh*).

E Breizh goude, e oamp chomet e-doug ar bloa-vezhioù 1914-1919. Ne oa ket kaoz eus dansoù avat, ken kriz ha ken poanius ma oa ar vuhez e-pad ar brezel-se. Koulskoude, e veze komzet a-wechoù eus an *Dérobée* pe eus ar *soubenn-læzh* pe eus an *Dafs-tro* a veze graet a-raok ! Toniou a oa anavezet c'hoazh gant merc'hed eus Pont-Melvez (eno, a veze lavaret, e kroge Bro-Gernev !) hag am eus desket gante, pa oan e pañsion e skol Moustere, er porzh-skol pe e-pad ar baleadennoù a raemp d'ar yaou pe d'ar sul !

Tro am eus bet c'hoazh da glevout, zoken e-pad ar brezel, sonioù «kan-ha-diskan». Setu penaos. An tren a dremene e porzh-houarn Moustere, a zeue eus Rosporden dre Garaez. D'ar sul, evel baleadenn, e tiskenna tud ar bourk da welout o tremen tran pemp eur. Gwech pe wech e veze ur soudard d'ambroug, echu e bermision hag o tistreiñ d'an emgann. En tren avat e veze kalzig eveltañ, Kernevez anezho, ha kement ha kemer kalon evit mont adarre etrezek lec'hioù al lazha-deg — tomm d'o fennoù un tamm bennak — a kanent. Un ehan dek munutenn a rae an tren, ha tostaat a rae an dud d'ar c'hombodoù da gomz gant ar soudarded, d'o c'honfortiñ dre verr-gomzoù pe dre ur jestr. Ha fromus e oa o c'hlevout o kanañ evel ma raent.

E Pariz e oan bepred, un dek vloaz bennak goude, pa rejomp anaoudegezh gant ur beleg breizhat hon lakaas, va c'hoar, danvez va fried ha me, da anavezout *Kelc'h keltiek Pariz*. Eno e

oamp en em gavet gant Breizhiz divroet adarre oc'h ober war-dro dansoù Breizh. Dre ma oant divroet eo e tougent muioc'h a-se a vri da gement tra a oa arouez o bro warnañ. Krouet e oa ar strollad *Korollerien Breizh-Izel*, hag e-touez an izili e oa Kernevez eus Rosporden-an Eliant; darn all eus an Uhelgoad pe Skrignag, unan eus Sizhun, reoù all c'hoazh eus Baod, e Bro-Wened, ha ni, Tregeriz. Pep rummad a anaveze korolloù o c'horn-bro hag a zeske d'ar re all, aketus da ziwall diouzh pep faltazi. Ur soner bennak a veze kavet e-touez izili kentañ K.A.V., soñj am eus bezañ graet anaoudegezh dre-se gant Herve ar Menn (Doue d'e bardono !) ha Roparz Aodig. Evit dansoù a oa, e veze kanerien en hon touesk, ha savet e veze komzoù e brezhoneg da vont gant an tonioù, pa veze ezhomm. *Gwinion* ha *reizh* e oa eta, an danvez ma raemp gantañ.

Goude-se, distroet da Vreizh, em eus bet tro, evel just, da glask dre ar vro, testenioù all. Merzet em eus, adalek neuze, e oa dija strolladoù hag a oa prederiet kentoc'h gant ober brav war al leurenn-c'hoari eget gant teurel evezh ouzh ar reolennoù. Hag e klevis evel-se, en ur sal, e Kemper, teir pe beder blac'h eus Bro-Bondaven — gante dilhad o bro, azezet er renkennad araozon — o lavarout etreze, feuket bras : «Mont a reont war an tu fall, mont a reont war an tu fall», e-keit ha ma oa korollerien, war al leurenn, oc'h ober ur Bal, hag o vont — gwir e oa — etrezek an tu dehoù e-lec'h an tu kleiz. Kement-se dre ma felle dezho lakaat ar merc'hed, gant o gwiskamantou kaer, da vezañ gwelet gwelloc'h gant an arvestourien ! Daoust ha graet e vez c'hoazh seurt fazioù ? En em c'houlenn a ran.

Dre ar rebechoù a reas aze merc'hed ar Vro, e komprenis gwelloc'h an dalvoudegezh a roe Breizhiz d'o c'horolloù, dre hengoun, an doujañs a virent en o c'heñver — daoust ma ne anavezet ket resis ken, ster al liderezh a oa gante —, feal avat, da virout an doare dereat evel ma oa dleet.

Distroomp bremañ, mar karit, d'an anvioù a vez roet, a zo bet roet d'hon dansoù. D'ar mare ma komzan anezhañ, p'am boa graet anaoudegezh ha studiet tamm pe damm Korolloù Breizh, ec'h anavezemp :
Evit *Kreiz Kernev* : an *Dafs-tro*, ar *Bal*, ar *Pechepi*, *Koroll ar bichier*, ha *koroll mesaerien Poullouen* ;
Evit traoñ-Kernev : ar *Gavotenn*, ar *Bal*, ar *Jabadao*.

Anavezet e raemp ivez ar *Jimmaska*, hag a oa dezhañ reolennoù disheñvel, peogwir e oa ennañ c'hwec'h taol er paz. N'em eus ket gallet reiñ un orin resis d'an danfs-se, daoust ma oa deuet gant Kernevez.

Evit Bro-Wened, e raemp gant an anv *Laride*, ha zoken gallekaet, *La Ridée*, gant ar stummoù (paz ha lusk) disheñvel : hini *Pondi*, hini *Baod*. Gant an Ao. Jakob (an drouz Eflamm Koed-Skaù), em boa desket danfs Lokmaria-kêr (miret an anv *La Ridée* evit) hag hini *Krac'h*, ma lavaras va c'helennier din e veze roet dezhi an anv gallek *Toume-vire* — pezh a drois brav e *Tro-distra*. Bez' e oa rannet ar c'horoll-se e daou : ur mare-vezh plén, hag ur mare-vezh en ur ober ar paz *lammet*. Ha gerioù a zo da heul, e brezhoneg ; skrivet en doa Eflamm Koed-Skaù ar gerioù-se evit ; miret em eus bepred an tamm skrid-se :

Ha mont a raemp, *mignon*, ha mont a raemp. E Kevredigezh ar C'helc'hioù keltiek a oa neuze o liammañ ar strolladoù niverus a oa savet evit lakaat da advezañ danveziou sevenadurel Breizh, e oa bet krouet *Kevrenn ar C'horoll*, ha bouc'het al labour enklask, ha resisaet an danvez e kement lec'h ma oa.

Anavezet eo ar pezh mell labour savet gant Y. Gwilcher evel tezen. Eno e kaver an disklariao-urioù a zo ezhomm war lec'hioù orin resis ar c'horoll-mañ-koroll.

Dilezet eo bet an anv *Ridée* ha disklriet e teue end-eeun eus ar gerioù *Larideno*, a vez alies oc'h echuiñ ar frazenn-gan. Kemeret ivez ar ger *An Dro*. Klevout a ran a-wechoù : «An andro» !

An anv *gavotte* pe *gavotenn* hag a vez implijet c'hoazh ? Un anv implijet e meur a vro eo, ha traoù iskis am eus lennet o lavarout eus petra hag eus plec'h e teue ar ger-se. An hini siriusañ am eus kavet eo ar pennad o reiñ da c'houzout e oa ar *Gavotte*, danfs ar *Gavoded*, tud o vevañ e traoñiennoù an Alpoù⁽¹⁾ ! Berzh a reas an anv betek e-touez tudjentil lez ar rouaned pe an aotronez veur. Ha penaos eo deuet da Vreizh ?

Lennet em eus ivez e oa bet graet ur seurt *Kendalc'h ar Broioù pe ar Rannvroioù*, e Baiona, war-dro ar bloaz 1565, hag e vije bet diskouezet eno gant pep strollad korolloù e vro. Daoust hag eno o dije pesketiaet Breizhiz an anv *gavotte* ? Kement ha c'hoari un tammig eo e lavaran se, rak, evel just, ne c'heller ket gouzout.

War ar ger *Bal*, a vefe pep tra da lavarout. *Baller* e galleg gwechall a dalveze kement ha «danfsal». *Mont da vale*, e brezhoneg, en deus ur ster disheñvel, hag e galleg e kaver ivez *balade* ha se *balader* evit lavarout memes tra. Pezh a zo avat, eo e kaver en danfs anvet *Bal*, ur pennad kerzhout skañv, dibredre, lusket mat, a-raok an eil pennad *lammet* ha gant troioù daou ha daou, pe pevar ha pevar.

Tro a zo er verb *treiñ*. Bez' e c'heller, da skouer, *treiñ tu*, *treiñ kein*, *treiñ barr*, *treiñ penn*, pe c'hoazh ober *tro* un dra pe ul lec'h bennak, tro al leur da zañsal ma vez c'hoant. Lavaret e vez ivez «ober un dro-danfs», da lavarout eo ur c'hrogad-koroll.

Jabadao. Ha dont a rafe, evel ma'z eus bet lavaret, diwar *Sabad* ? An ton hag al lusk a vez gant an danfs-se a ziskouez un nerzh kresket ; ar Jabadao a vez graet d'an trede, pa vez urzhiet ar c'horolloù evel ma'z eo dleet. Ur birvilih a sav gant an danserien adal ma krog ar Jabadao. Ur c'helc'h a *eizh* a vez evit ober an danfs-se : pevar baotr, peder blac'h, pe pevar c'houblad, mar deo gwel ganeoc'h. E-pad ur pennad a *div wech eizh taol* sonerezh e reer an dro, dorn-ouzh-dorn, gant ar paz diazez boutin. D'an eil pennad ez a ar baotred etrezek ar c'hreiz (pevar daol) ; goude e reont ur paz war-dreñv, ha pep paotr a dro etrezek ar plac'h en em gav aze war an tu dehoù ; kinnig a ra an dorn dezhi hag e laka anezhi da dreñ dre zirazañ ; a-benn ar pevare taol ec'h en em adkavont holl adarre, e stumm kentañ ar c'helc'h a *eizh*. Ar merc'hed o deus, e-pad an eil pennad-se, merket ar paz war al lec'h. Ne oa ket dereat d'ar merc'hed mont, evel ar baotred, etrezek kreiz ar c'helc'h. Gwelet e vez a-wechoù o vont gant ur paz war-raok etrezek ar c'hreiz : n'eo ket lavaret e vefe aze un astenn hervez an hengoun ! Gant ar stumm nemetañ d'ar baotred da vont er c'hreiz, ha lakaet an danfs da badout tamm pe damm, en em gav ar gorollerien evel entanet, sorc'hennet !

Klevet em eus ivez komz eus ur mare-vezh ma oa anvet ar *Jabadao*, danfs an diaou, ha gwelet fall gant ar veleien hag an dud devoi. Un arouez-læzh a zo gantañ a dennfe d'ar planedannoù en-dro d'an heol ! An arouez-læzh ? Evel just e c'heller klask enni a bep seurt traoù.

Me sellomp bremañ ouzh ar ger *Trihoari*, mienegat e danevelloù kozh ; dilezet eo bet ar ger-se ha ne ouzer nemet dre an danevelloù-se petra 'oa ar c'horoll-se. Hervez ar skrid : tri faz hag ul lammiñg. Kement-se a glot a-walc'h gant steuenn ar paz diazez anavezet bepred en hor c'horolloù.

Ha gellout a reomp klask star ar ger-se e *«tric'hoari»* ? Marteze. Manet ez eus — manet e oa, a dlefen da lavarout kentoc'h o komz eus ur mare-vezh, bremañ ez eus ouzhpenn daou-ugent vloaz ! — en-dro da Vear an efhor eus an danfs anvet eno : «Un taol-troad da Bipi — Hag un all da Jakob — Hag un all da Vaïnon — Ken re lero n'partons». Ar paz : war-raok, gant an troad kleiz da gentañ, e-pad tri daol, d'ar pevare gant ul lammiñg, kaset an troad dehoù e krouz, — hep sevel re ar penn-gliz — dirak an troad kleiz. Hag evit mont d'an eizh taol, hevelep triav gant an troad dehoù da gentañ. Ar pennad kentañ leizh

taol) a veze graet en ur renkad daou-ha-daou en ur vont war-raok. Evit an eizh taol war-lerc'h, e veze da gentañ pevar, en ur gerzhout, da eil : ar paotr o lakaat e gavalerezh (evel ma veze lavaret) da dreñ dre dindan e vrec'h en ur zerc'hel bepred dorn ar plac'h hag en ur ober ar paz war al lec'h. Roud em eus kavet ivez gant gwraez eus Louer-gad eus an doare ober an dafis-se gant tri — pezh a addegas ac'hanomp d'hon anv *trihori adjarra* : ur paotr o reiñ dorn da ziv blac'h, unan a-gleiz, unan a-zehoù. Ar paz hag ar jestroù a oa heñvel ouzh pezh emañ o paouez displegañ. Da echuiñ goude tro ar merc'hed dindan brec'h ar paotr, en em gavet o zri war-seun, e raent un tammig stouadenn. E strollad *Korollerien Bro-Dreger* a oa ganeomp d'ar c'houlz-se, e oa desket mat an dafis-se ha kavet plijus.

Kent echuiñ e fell din merkañ peseurt urzh a veze heuliet evit pep krogad en un abadenn-goroll — da vihanañ evit an hini kentañ. Rak ne groger ket gant se, n'eus forzh penaos. Ret e oa mont hervez ar c'hiz, al lid.

Da gentañ e oa ar «Galv», met kement-se a vez graet bepred marteze, e Kreiz-Kernev. Loeiz Roparz ha Yann Lalloued em eus desket gante, e-pad ma oant e Pariz, an ton hag ar gerioù-mañ :

Deus ganin 'ta, karnaled, hon-daou pa'z omp en em gavet

Deomp da gansañ an abadenn pa n'omp ket

'vit miret

Ni c'hoario, a zafso, en em «vac'hatao hon-daou

A ambrougo Marjanig d'ar gêr eus ar foarioù !

Al lusk-gorrek da vont gant ur c'herzhout brav a veze kendalc'het gantañ buanoc'h, da vont gant an dafis o kregiñ neuze.

Gwelet em eus ober gant ur seurt lid en un eured e Plourac'h, e-kichen Kallag, nemet e oa *sonet* gant un akordeoñs. Ne oa ket neuze, e 1938, nemeur a sonerien biniou ha bombard. Mont a rae ar soner d'ober un droig war al leur, ha

tamm-ha-tamm, e-pad ar galv, e teue war e lerc'h an dud nevez, o c'herent hag an dud-enor. Dañsal a raent ur pennadig evel-se ha goude, e teue holl dud an eured d'en em lakaat e chadennad hir ar c'horoll.

KLOZADUR

An dafisoù a-dal : *Pler-Lann, Pachepi* o deus o ster fidel. Hag ar *Jabadao* ? Soñj am eus bezañ klevet danserien gozh o c'hoarzhin dre fent — ha feuket ivez — pa welent, er jabadao, ar merc'hed o vont etrezek ar c'hreiz (evel m'am eus lavaret bremaik). Hervez an hengoun eo d'ar baotrad hepken hen ober, hag en em dreñ goude, evel m'eo dleet, etrezek ar merc'hed chomet en o lec'h er c'helc'h, evel evit o gervel, o fedañ da zont da zañsal. Un arouzelezh a c'heller gwelout aze hag a zo torret, bloavezhioù a zo, evel ma ouzon, bepred evit «ober brav» gant ar soñj pinvidikaat an danvez, ijinañ un dra nevez dirak an arvestourien.

NOTENNOU GANT AR RENEZEZH

1 Ar pennad a-us a oa danvez ur gaozeadeg evit *Kamp keltiek ar Vrezhonegerien*, Pont-e-Kroaz 1974. Embannet e vo an destenn war he hed gant K.E.A.V.

2 Hent an Heol ? Ar prosesonioù o-unan a heuilh ivez Hent an Heol : treiñ a reont en tu ma tro an heol en oabl, evel nadozioù ur montr, ha da glozañ ar prosesonioù e vez enaouet an tantad-tan evel ur prof d'an Tan a vuhez m'eo an Heol.

3 Al levrioù war lstor an Dafisoù a lavar ez eo eus *gaveau* e teu ar ger, da lavarout eo eus *Gap*, pa reer *Gaveaux*, eus tud *Gap*. Ar ger-mañ avat, ne glot ket gant an anv a vez graet eus *Gapiz* : *Gapençois*. Bez' ez eus avat en okitaneg, ur ger *gavôt, gavota* = meneziad(eg) eus Lozera (menezioù Kebenna). Daoust ha ne vefe ket orin ar ger da glask eno ?

KELEIER eus KEMBRE

Ur person paotr a-raok. Ar Reverant Goronwy Evans, person gant an Undedourien (*Unitarianed*) e Llanbedr Pont Steffan, a ra gant un ardivink-jubenniñ en e ofisoù. Bez' e vez ur pemzek bennak a dud digembraek en e chapel e-touez 220 kembraeger. Ober a rae da gentañ un ofis e saozneg ur wech ar miz evit ar pemzek-se ; a-benn ar fin ez eus bet prenet un ardivink-jubenniñ hag e c'hell pep unan ober gantañ, ma kar, dre ur skingaser lakaat er sekreteri. Pa ne vez ket implijet an ardivink evit an troidigezhioù, e c'hell servijout d'an dud tefivalgleved. E Breizh ne vefe ket fall kaout ardivinkoù evel-se e-lec'h treiñ war ar galleg kerkent ha ma vez daou pe dri galleg e-touez ar vrezhonegerien. Dispignoù a vefe, se 'zo sklaer, met ret e vefe da gentañ stummañ jubennourien.

Un eskopti katolik nevez e Kembre. Betek hen ne oa nemet daou eskopti katolik e Kembre. Kornbro Henfordd hag a vez sellet evel oc'h apar-chantañ ouzh Kembre, a oa stag ouzh arc'h-eskopti Kêrdiz abaoe ar Pab Benead XV, e 1916. Evel arc'heskob Kêrdiz emañ an Tad John Murphy, a orin iwerzhonat, gant an Tad Daniel Mullins, evel eskob-skoazeller ; hemañ a orin iwerzhonat ivez, a zo akuit-meurbet war ar c'hembraeg. An eskob all a zo e Wreksam, an Dr Langton-Fox, a vez graet anezhañ eskob Menoe (*Mynewy*), anv kozh eskopti Ti-Dewi (*Ty Ddewi*).

Iliz ar Werc'hez ha Gwenfrewi o lidañ ha c'hant vloaz. En Aberystwyth eo bet lidet kant vloaz iliz ar Werc'hez ha Gwenfrewi (*Eglwys Fair â Gwenfrewi*). Ar barrez, gant iliz ar Verzherien Gembreat, bet savet e 1970, e Penn-parcou (*Penn-parcau*), iliz Steredenn-ar-Mor er Borth, savet e 1969, hag iliz ar Groaz Venniget (*Eglwys Seren y Mor* — *Eglwys y Groes Fendigaid*), savet en Aberaeron e 1968, a ra 650 a viltirioù karrez ! Ar

person eo an Tad Hoekstra, genidik eus Bro-Frizia, ha 903 a barrezianz a zo en e garg.

Dek sizhun da zeskñ kembraeg. Gant o skolioù divyezhek, ar skolioù-noz, o c'hampoù, dreist-holl kampoù *Urdd Gobaith Cymru*, a teu a-benn Kembreiz da addeksiñ o yezh. Met evit deskiñ ervat ar yezh ez eus ezhomm, gant an dud vras, eus meur a vloavezh, hag eno, evel e Breizh, goude bezañ kroget da zeskñ ar yezh ez eus deus e Kembre degemaret an doare-kelenn implijet e Bro-Israel da zeskñ hebreeg buan-ha-buan d'an dud nevez a zeu da chom da Israel. *Ulpan* a vez graet eus an doare-se. Warlene e oa bet graet un taol-esae e Kembre. Evit ar bloaz, en Aberystwyth ez eus bet adarre ur rummad kentelioù *Ulpan*. 30 a dud vras o deus desket ar yezh en ur ober dek sizhun. Rannet e oant e daou strollad hag a veze pemp kentel a ziv eurvezh bep sizhun. Tud a bep renk a oa o heuliañ ar c'hentelioù. Ken mat o deus an diskibled desket ar yezh, ma'z eus bet anvet unan anezho, un den a iliz, da berson en ur barrez kembraek.

Ar pep diaesañ evit an doare-kelenn *Ulpan* ez eo kaout kelennerien akuit niveruzik ha dav d'an diskibled kaout amzer da heuliañ ar c'hentelioù, ha d'en em «veuziñ» er c'hembraeg. E Breizh ez eus bet milieroù a dud o klask deskiñ ar yezh hag o c'hwitout war o zaol, hag o lezel studi ar yezh war he c'hement all. Daoust ha ne c'hellfe ket skouerioù ar pobloù all bezañ ur sklerjann evit ar vrezhonegerien ?

Cymdeithas yr Iaith : a seblant bezañ en un enkadenn. Aon o deus darn anezho d'ober gaou ouzh *Plaid Cymru* 'benn ar votadeier da-zont, gant o zrioù taer... Met trouz a zo bepred dre ma'z eus divizet, evit ar skritelloù-hant, e vefe ar c'hembraeg dindan ar saozneg. Komz a ra ar *Gymdeithas* eus tremen livaj war ar saozneg.

Klerg.

J. Herri

MABIG BIHAN ROUE FRAÏNS

(Yezh Tregor)

Un deiz e oa roue Fraïns o pourmen war bord ar Senta), hag en o welout ur c'hased-koad oc'h erruout gant an dour 'hed ar rinier : «Petra 'sinifi, eme ar roue, ar c'hased-koad a zo o tont aze a-hed ar rinier ?» Eno e oa bagoù-pesketaerien, hag en ober tapout ar c'hased-koad. Pa oa tapet ar c'hased-koad ha digoret, e oa ur bugel bihan e-barzh. Nemet e oa serret-mat ar c'hased, n'ae ket an dour e-barzh : «Ma l'eme ar roue, da biv eo hemañ ? Ur vamm fall bennaket he deus bet hen laket amañ evel-hen. Petra 'vo graet dioutañ ? Petra a rin, met kas anezhañ ganin d'am falez ha sevel anezhañ ?» Kaset ar paotr bihan d'e balez neuze d'e sevel. An amzer a dremene. Hemañ 'veze graet mann 'met Mabig bihan Roue Fraïns dioutañ. Daou vabig all c'hoazh en doa ar Roue, ha dam memes oad e oant. Hag int paotred yaouank gant hemañ.

Met un devezh ec'h eo en em gavet klañv ar roue, ha klasket 'zo tout ar vedisined war e dro, na gwellaat anezhañ n'eus ket 'voaien d'ober. Hini 'bet ne oa kat da zont a-benn da wellaat anezhañ gant forzh petore louzouoù 'oa. Feiz ! Klevet en doa ar Roue kormz eus unan a oa 'barzh e Lanvêleg o chom, hag a veze graet Paotr Roz-Koele dioutañ. Henezh ne oa ket medisn, met a ouie ober louzouoù da wellaat ar dud evel-se. Galvet Paotr Roz-Koele gant ar roue da zont d'e gaout da welet hag-en oa kat d'ober un dra bennak dezhañ 'vit skañvaat e boanioù. Hemañ o vont da Barz da gaout ar roue d'e balez. Pa oa erruet da vizitañ ar roue, evel ar vedisined :

«Feiz ! emezañ, me n'on ket kat d'ober louzou ebet deoc'h, met gout 'ouzon penaos, a-raok ma wellafet, hoc'h eus ezhomm da evañ dour eus feunteun Rouanez ar Skloz. Honnezh a zo 'barzh e Bro-Saoz. N'eo ket aezet mont di ; ret eo mont gant ur vatimant evit kerc'hat dour diouti.»

Ar mab hemañ a oa aze o seleoù : «Me, ma zad, a zo o vont gant martoloded hag ur vatimant, da gerc'hat ur voutailhad dour eus feunteun Rouanez ar Skloz deoc'h, evit gwellaat ac'hanoch.»

— O ! emezañ, mar 'zo ret mont keit-se da gerc'hat dour !

— Sellit, va zad, pegeit 'zo 'c'h oc'h klañv ! Amañ 'zo aez a-walc'h da gerc'hat dour !»

Hag hemañ o vont gant e vartoloded hag e vatimant 'trezek Bro-Saoz. Dre forzh rogañ an dour 'barzh ar mor, ec'h int erruet 'barzh ar c'hostez all. Pa 'c'h eo bet diskennet eus ar vatimant, hemañ en deus laret d'e vartoloded chom eno da c'hortoz anezhañ d'ober e dro. Met pa oa savet war an hent bras, e oa un tort kozh eno o tertiñ mein da lakaat war an hent :

«O ! eme hemañ, Mab hemañ Roue Fraïns ! O vont da belec'h out-te evel-se ?»

— Se 'zo ingal deoc'h-c'hwi, emezañ, kozh tort, da belec'h ec'h an-me ! 'P eus mann 'met tertiñ mein aze ; se 'sell ket ac'hanoch-c'hwi...»

— C'hwi 'zo gweli c'hlorus deoc'h, eme an tort, o vont evel-se.

— Ya, emezañ, ne blij ket din bezañ diaezet gant kozh tortoù seurt deoc'h-c'hwi !

— Ma l'eme aze aet da vatimant aze en ur wezenn-fav, ha da vartoloded oc'h ober brankoù dezhi, ha te un evn bihan o tertiñ mein amañ bemdeiz hag o klevout ac'hanoch-c'hwi ! Kerkent, ar vatimant a savas eus ar mor, hag o vont e korf ar wezenn-fav, hag ar vartoloded a oa aet e brankoù, hag hemañ un evn bihan war he beg.

«— Aze, eme an tort, bremañ 'c'h out mat ur pennad.»

Paotr Roz-Koele 'zo chomet bepred e ti ar roue da c'hortoz an dour d'erruout. Tremenet eizh deiz, pemzek deiz, an dour n'errue ket :

«Memes tra, a-benn bremañ, e tleje bezañ retornet gant an dour. Se 'mañ ket keit-se malurus.»

— Ma l'eme an eil eus ar vibien, me 'zo 'vont da welet pelec'h eo chomet.

— Ya da, eme ar roue, pa n'en deus ket gallet egile rruout, ec'h eo beuzet, aet ar vatimant d'ar foñs, pe un dra bennak evel-se ; ne dal ket ar boan dit mont, ha goude ne vo den ebet da gemer ma c'hurunenn war ma lerc'h.

— O ! se 'ra mann ebet, emezañ, me 'rank mont da gerc'hat dour, ha da welet pelec'h eo chomet egile. Mar erru ganin, feiz ! e retornin gantañ d'ar gêr.»

Roet ur vatimant da hemañ, ha martoloded ivez, kemeret ur voutailhad gantañ evel egile, hag aet 'trezek Bro-Saoz. Met erruet eo da ziskenn en tu all, just 'barzh ar memes andred hag egile. Chomet e vartoloded hag ar vatimant eno o c'hortoz anezhañ hag hemañ a zo savet war an dour ; hag eno e oa ar paotr kozh o tertiñ mein :

«Hola ! vat ! eil Mab Roue Fraïns, o vont da belec'h out-te evel-se ?»

— Se 'sell ac'hanoch-c'hwi, kozh tort kozh, da belec'h an-me ?

— Hola ! gweli c'hlorus eo dit, kaer ac'h eus bezañ Mab Roue Fraïns.

— Ha c'hwi, n'hoc'h eus nemet tertiñ mein 'pad an deiz ! Se 'sell ket ac'hanoch da belec'h an-me !

— O ! mar deo ken glorus-se dit, ma vije aet da vatimant en ur c'horf gwezenn-fav, ha da vartoloded oc'h ober brankoù dezhi, ha te en un evn bihan o kanañ war he beg, se 'rafe brav aze ! Evel-se e vefe daou vreur o kanañ kichen-ha-kichen !»

Kerkent, ar vatimant a oa savet ac'hano eus ar mor hag aet 'n ur wezenn-fav, hag ar vartoloded oc'h ober ar brankoù, hag hemañ war ar beg o kanañ.

«— Bremañ, eme an tort, 'c'h oc'h brâv aze, ho-taou.»

Kaer en devoa Paotr Roz-Koele gortoz an dour d'erruout, ar roue a chome bepred klañv, an dour n'errue ket.

«Ma, eme Mabig bihan Roue Fraïns (na veze graet ken dioutañ), me, emezañ, ma zad (peogwir e rae e dad dioutañ), a ya da vont da welet pelec'h eo chomet an daou all ; me 'yelo da gerc'hat dour deoc'h da feunteun Rouanez ar Skloz.

— Ya, eme ar roue, klev piv ie 'ta ! Pa'z eo manket an daou all, memes tra, da gerc'hat dour, 'vit 'n'eo ket te a raio moarvat !

— O ! eo ! emezañ, me 'rank mont da gerc'hat dour deoc'h ivez, evel ar re all.»

Kement ha kement a drouz a rae, ken e oa laosket da vont gant ur vatimant ha martoloded ivez.

Hag hemañ 'trezek Bro-Saoz. Erruet eo da ziskenn just 'lec'h 'oa diskennet an daou all. Hag en o leuskel e vatimant ha lavaret d'e vartoloded :

«Chomit eno da c'hortoz ac'hano bremañ, keit ha ma vin o kerc'hat dour, p'am bo kavet ar feunteun, rak n'on ket pelec'h emañ.»

Pa oa savet war an hent bras, eno e oa an tort bihan o tertiñ mein bepred war bord an hent bras-se. Bemdeiz 'veze eno moarvat :

«Hola ! vat, emezañ, Mabig bihan Roue Fraïns, o

vont da belec'h out-te evel-se ?

— Feiz ! ma faeron kozh, n'on ket kaer o vont da belec'h on. Me 'zo 'vont da gerc'hat ul litrad dour eus feunteun Rouanez ar Skloz evit gwellaat ma zad, met n'on ket pelec'h emañ ar feunteun.

— Añ ! 'me an tort, me a laro dit pelec'h emañ, mar kerez.

— Ya ? C'hwi 'oar pelec'h emañ ?

— Ya ! 'mañ ket gweli-bell ac'hano ; war dro un hanter-lez ac'hano. Met Rouanez ar Skloz, er momed-mañ, a zo kousket, peogwir e vez seizh vloaz kousket ha seizh vloaz dihun goude. Er momed-mañ eo kousket. Ar feunteun a zo 'kreiz ar porzh, goloet gant un dablezenn aour. N'az pu mann 'met sevel an dablezenn-se ac'hano ha kargañ ur voutailhad dour. Setu e c'helli kaout dour memestra.

— Ma l'eme hemañ, se 'zo mat ! C'hwi hoc'h eus erru naon ha sec'hed aze o tertiñ mein ; ket betek ma batimant da zebriñ ha da evañ ur tamm, peogwir hoc'h eus kelennet ac'hano.

— Ma l'eme an tort kozh, 'c'h an da vont da glask ur bannac'h gwin pa un dra bennak all digante.

— Ya, ya ! Ket ha laret dezhe servijañ ac'hanoch ervat.»

Ha Mabig bihan Roue Fraïns 'zo partiet 'trezek feunteun Rouanez ar Skloz. Pa 'c'h eo erruet er porzh, en a welas un dablezenn-aour o c'holeñ ar feunteun ; «Amañ 'rank bezañ ar feunteun. Hag en da sevel anezhi : «Ya, emezañ, amañ 'zo dour !» Hag en da gargañ e voutailhad dour.

«Ma l'emezañ, daoust hag en, ma vije antreet er c'hastell da welet penaos emañ kont. Mar dao kousket, m'am bije gallet gweli Rouanez ar Skloz, da welet petra eo ivez !»

Hag en soñjal mont 'barzh ar c'hastell. Aet e oa dre ar viñs da kroec'h. Pa oa 'vont evel-se hag en a zigoras ur gambr ha ne welas mann ebet, 'met un tamm taol a oa eno, hag un tamm bara war an daol a oa merket war an tamm bara-se ; Kast a veze troc'hañ dioutañ, ne gouzhe tamm.

«Hola ! emezañ, sed aze traoù evsek. Met ret eo din mont da welet pelec'h emañ.»

Pa oa 'vont 'vel-se, hag en o welat ur sabrenn eno hag a oa merket warni ; Pa veze savet da kroec'h, tout 'pezh a veze eno dirazh a gouezhe eno marv : «Hola ! emezañ, sed aze traoù evsek.»

Dre forzh digertañ dorjoù ar c'hambrou e oa eno, 'benn ar fin eo kouezhet 'lec'h 'oa ar rouanez o kousket. Hemañ 'wel anezhi eno war he gwela, kousket-mat, kousket-marv :

«Damañ, emezañ, ur plac'h koant eo !» Hag en bale sioul 'tal he c'hichen, sellat outi. «Ma l'emezañ, tampi ! Ma 'zo 'vont da reiñ ur pok dezhi, tampi ! Mar dao kousket, ne zhumo kets. Hag en o tastaat sioul dezhi hag o pokat dezhi.

Met bet en deus kalz a hast da vont betegout na zihunfe.

Met pa oa o tremen, eñ o welet ar sabrenn : «Petra m' bije graet ? Me m' bije kaset ar sabrenn ganin a-walc'h.» Hag eñ o tapout ar sabrenn hag o lakaat anezhi dindan e zilh. Neuz, pa oa o tremen ar gandr all 'lec'h 'oa an tamm bara : «Ma l' emezañ, m'am bije kaset an tamm bara-mañ ganin. Tampi l' Mar deu war ma lerc'h, ingal eo l' Feiz l' Kaset an tamm bara gant ar paotr ivez. Tapet e voutailhad dour eus kreiz ar porzh ha war-raok etrezek e vatimant.

An tort a oa bepred eno o terrin mein :

«Ac'hanta, emezañ, bet 'c'h eus ur bannac'h gwin hag un tamm bara digant ar vartolodet ?»
— Ya, ya, eme an tort (tommet mat e oa d'ar paotr kozh a-benn neuze). Ya, ya l' Servijet mat o deus ac'hanon.

— Amañ, emezañ, 'zo ur vro vray l' Chomet da gaozaal evel-se gant an tort. «Ma l' emezañ, sed aze div bezh gwezen-fav. Biskoazh n'em eus gwelet kement all na ken tev all.
— Ya 'vat, eme an tort, ar re-se a zo div wezenn vat a fav.

— Ya, eme Mab bihan Roue Frañs, du-mañ n'eus ket 'seurt-se neblec'h ebet, 'soñj ket din.
— Nann, eme an tort, ar re-seoù ac'h eo da zaoù vreur a oa deut da glask dour, met ken divergont aze div bezh gwezen-fav, ken vil, ken am boa lakaet anezhe da vont er gwez-fav. An evned bihan a zo aze o kanañ war o beg ac'h eo da vreur, pe gontoc'h, mibien ar Roue, pa n'int ket breudeur dit, e gwirionez. Ar vatimant a zo e kof ar wezenn, ar vartolodet a zo a brankoù.

— Hala l' eme hemañ, ne vefec'h ket kontant da lezel anezhe da zont asambles ganin d'ar gêr ; oc'h ajemp hon-tri asambles d'ar gêr ?
— O l' eme an tort, 'welloc'h eo dit mont da-unan 'trezek ar gêr evel ma 'c'h out deut, rak ar re-se 'zo moaien da draisañ ac'hanout.
— Ne raint ket l' Laoskit anezhe ganin ma 'c'h efomp hon-tri d'ar gêr asambles.

— Feiz l' eme an tort, Koulskoude, n'afian ket ac'hanout tamm ebet da gas anezhe ganin.

Met kement ha ken bihan e talc'he warnañ ken 'benn ar fin en deus asantet leuskel anezhe da vont : «Met, emezañ, a-raok lakat anezhe evel ma oant a-raok, ac'h an da gelenn ac'hanout da glenkañ-da voutailhad-dour, an hini ac'h eus karget eus ar feunteun, ha da gargañ un all ha lakaat anezhi 'barzh da c'hodell, met klenkañ eben oute, betegout na vefes traiset gante.»

Mabig bihan Roue Frañs o sentin outañ, o kargañ ur voutailhad-dour eus ar mor hag o lakaat anezhi en e c'hodell hag o lakaat eben

dindan e zilh da glenkañ anezhi ouzh e vreur. Ar paotr kozh neuze a lak an div wezenn-fav da vont e batimantou ; hag ar vartolodet hag ar mibien a oa deuet da vezañ avel ma oant a-raok.

Ne oa ket ur vech gwelet anezhe o-zeir o vont dre ar mor. Met e-lerc'h mont pep hini en e vatimant, ec'h int bet aet, an tri mab-mañ, war ar memes hini. An daou goshañ, evit-se, goude bezañ aet ur pennad evel-se, a zo en em glevet : «Ma l' Ur vech eo dimp memes tra hon-daou, e vefe hemañ en defe kavet dour da wellaet hon tad, ha ni n'hon eus ket gallet ober, goude bezañ mibien dezhañ. Bremañ ni 'vo gallet pa 'c'h errufomp... M'hor bije dilamet e zour digantañ ha darc'havet anezhañ war e benn er mor ?
— Pemaos, eme egile, ober se ?
— Damen ! emezañ, emañ an dour en e c'hodell a-gostez. Te 'dapo ar voutailhad keit ha 'vin-me o reiñ un taol-bount dezhañ eus an tu all, hag er c'heit-se, kazi hep gout, e skofomp anezhañ er mor.»

Hag l' o tostaat da vord ar vatimant ha da lavaret : «Sell l' Gwashañ pesked 'zo o tremen dre amañ dre vord ar vatimant !

— Ya ? emezañ.
— 'Welez ket ar pezh traoù-se o tremen ?»

Hemañ 'oa pleget ; ne oa ket o soñjal oc'h esao ober petra e oa ar re-seoù dezhañ... Unan a daspas krog en e voutailhad-dour, hag egile o reiñ un taol-bount dezhañ ha skoet anezhañ war e benn er mor.
Hemañ a frinke 'barzh an dour. Evruzamant a ouie neuñ. Gallet en deus en em zifretañ 'barzh an dour hag en deus kavet ur roc'hell hag en deus gallet sevel warni, hag evel-se n'eo ket bet bezuet : «Feiz l' emezañ, mar tremenje ur vag-pesketaer bennak, marteze en dije gallet kas ac'hanon betek an douar ! N'on ket pegeit eo bet chomet eno da c'hortoz ur vatimant bennak da dremen. 'Benn ar fin 'zo degouezhet d'ur vag-pesketaer tremen dre eno hag en deus goulennek digantañ dougen anezhañ d'an douar.

An daou all 'vat 'zo aet d'ar gêr gant o batimantou. Batimant egile a yae d'o heul, met pa 'c'h int erruet, eo aet an daou all d'ar gêr ; nemet ar vartolodet n'int ket aet da gaout ar roue, hag ar re-mañ a zo bet lipr da laret 'seurt a gerent. Met Paotr-Roz-Koele p'en devoas kroget er voutailhad-dour : «Hemañ, emezañ, n'eo ket dour eus feunteun Rouanez ar Skloz.
— Eo, eme ar re all.
— O l' N'eo ket 'vat l' Hemañ n'eo ket eus ar feunteun a zo eno. Anaf eo n'eo ket l' Ha p'en

devoa klasket gwellaat ar roue, ne oa mann d'ober. Ar roue ne wellae tamm ebet bepred l'

E-pad ar c'heit-se e oa bet degaset Mabig bihan ar Roue d'an dour gant ar vag-pesketaer, met goude ma oa bet diskennet eus ar vag, ne oa ket erru er gêr c'hoazh, rak pell a chome gantañ d'ober war e droad... Un deiz ma oa o treuzin ur gêr bennak, e oa an dud enc trist-trist, rak erru 'oant prest da vervel gant an naon.

«Petra 'zo kaoz deoc'h da vezañ trist, eme hemañ, evel-se, tout amañ ?
— Amañ eo manket ar bara ; setu pemzek deiz 'zo n'eus bet tamm ebet ; erru eo prest an dud da vervel gant an naon.
— Damen ! emezañ. Tostait ha me 'c'h a da reiñ bara deoc'h.»

Hag hemañ o tapout krog en e damm bara ha da droc'hañ bara. N'on ket pegeit e oa bet oc'h ober, ken e oa leun o c'hof tout bepred e oa. Ha kaset pep a damm mat gante c'hoazh ; pep hini a groge gwellañ ma c'helle evit chom hep kaout naon ; hag hemañ goude bezañ o servijet, a vane kement all gantañ bepred.
Pedet a oa bet ha milbedet da chom gante enc, met n'houle ket ober.

«Me, emezañ, a rank mont betek Pariz da gas dour d'am zad, ha ne c'hellan ket chom ganeoc'h.»
Hag eñ 'trezek Pariz adarre. Ur pennad mat en devoa d'ober.

Goude-se eo bet en em gavet 'barzh ur gêr all. N'on ket pe oa 'brezel pe ne oa ket, met an enebourien a oa d'erruout da fontañ kêr. A oa trist an holl dud.

«Petra zo erru ganeoc'h pa 'z oc'h ken trist-se ?
— Amañ, emeze, ar gêr ac'h a da vezañ draihet. An enebourien 'zo 'vont d'erruout warnomp hag ac'h a d'he drailhañ.

— Ing'al 'zo, emezañ, lezit anezhe da zont hardizh.»

Hag eñ pa oant komañset d'erruout, o tapout e sabrenn, o sevel anezhi da kroec'h. Dre ma 'c'h erruont, e kouezhent holl eno marv. Saveteet ar gêr-se gant tout ar pezh a oa e-barzh.

Feiz l' Pedet ha milbedet gant tud kêr da chom eno gante, ma karje ; ne vankje mann ebet dezhañ. Met hemañ ne oa mann d'ober gantañ.

«Me 'rank mont da gas dour d'am zad a zo klañv ; ret eo din mont d'ar gêr da gas an dour dezhañ.»
Hag hemañ 'trezek Pariz.

Met pa oa o vont dre an hent evel-se, ec'h erruas

unan bennak da skeiñ gantañ war e skoaz : «He l' Mab bihan Roue Frañs, te a zo deut ma sabrenn ganin ha neuze ma zamm bara l'»

Rouanez ar Skloz an hini 'oa. Pa oa dihunet, e oa deut war e lerc'h ha tapet anezhañ

«Ya, emezañ, N'en deus ket nac'het out.
«Met bremañ, emezi, e vank dit dont ganin.
— Ya, emezañ, met n'on ket bet o kas an dour da wellaet ma zad c'hoazh.

— Ac'hanta l' emezi. Me ac'h a da gas ac'hanout da di da dad, ha goude kerkent, e retorni ganina. Hag hi tapout krog ennañ, kazi 'vel kregin en ur bugel. Ne ouie ket dre belec'h e oa tremenet ken e oa laketa a-fas da balez ar roue 'barzh e Pariz.

«Sed bremañ, emezi, e vank dit mont da gas an dour. Me avat, n'em eus ket droed da antren. Un eur a roan dit d'ober da dro. Gant se, bez erru 'benn un eur amañ, mar kerez, peotramant 'zo fin dit goude.»

Feiz l' Hemañ o sentin outi hag o vont d'ar c'hastell da gas an dour. 'Benn neuze e oa Paotr-Roz-Koele e-barzh, met erru 'oa skuizh o c'hortoz. Hemañ o reiñ an dour dezhañ :

«Añ l' emezañ, hemañ 'zo dour eus feunteun Rouanez ar Skloz. Anaf eo l' Sell l' Bremañ, Sir, avet eus an dour-mañ l'»

Kerkent ar roue oc'h evañ ur bannac'h dour, hag en em gavet e oa 'yac'h, evel pa ne vefe bet biskoazh klañv :

«Bremañ, emezañ, ta bepred az po ma c'huru-nenn 'lec'h an daou all.
— Me, n'em eus ket ezhomn da gurunenn. Me a rank partiñ diouzhtu gant Rouanez ar Skloz a zo deut war ma lerc'h da gerc'hat ac'hanon. Me a ranko dimeziñ dezhi bremañ pe e kemero ac'hanon. N'em eus ken 'met un eur d'ober ma zro, n'em eus ket kalz a amzer da gontañ kaoziou.»

Met bet en deus amzer da gontañ petore troioù o devoa graet an daou all dezhañ. Goude-se e oa retornet da gaout toull ar porrastell 'lec'h ma oa ar rouanez ouzh hen gortoz. Ha hi a daspas krog ennañ, ha dreist ar gwez bras hag an tiez uhel, e oa en em gavet e Kastell Rouanez ar Skloz 'lec'h 'oa bet o kerc'hat dour.

«Setu bremañ, emezi, e vank dit dimeziñ ganin, hag e vo pedet ar Roue hag e tron da zont d'an eured, gant na zeuy ket an daou all ; ar re-se a zo daou dreitour ; ar re-se a zo bet kanañhez ez keñver.»

Setu neuze eo bet laketa an eured, ma n'on ket petore deiz, met graet eo bepred, ha pedet ar Roue hag e tron d'an eured. Met neuñ pled mat ar Roue hag e tron, p'o deus bet ar c'hodell, d'an eured, da Vro-Saoz. Ma 'lar deoc'h pemaos 'barzh an eured n'eo ket laret e vankje seurt ebet eus ar seurt a oa, na yod fritet, na yod da fritañ ;

ha yod war glud ar yer da yenañ n'eo ket laret e vankfe ivez.

Ha bremañ, pa 'c'h eo tremenet an traoù, ec'h eo deut Rouanez ar Skloz da laret d'ar Roue : «Bremañ, emezi, e vank deoc'h, pansogwir eo bet traiset herañ gant an daou vab all, a werzh-fet tout ho traoù hag o lodennfet etre ar beorien, met just ar pezh hoc'h eus ezhomm da vevañ, hoc'h ltron ha c'hwil, rak an daou-se o deus

ezhomm da vezañ laket da labourat evel an dud all ; evel-se e teskfont bevañ». Hag abaoe, n'em eus ket klevet komz dioute.

NOTENNOU

1 Adskrivet eo ar gontadenn diwar ur vandenn enrollet e Kêr-Hued, ar C'houerc'hed, e ti J. 'n Herri, ha kalz a stummoù tregeriek hon eus lezet.
2 Tampi eo a lavare ar c'honter = gwazh-a-se.

EMBANNADURIOÙ BARR HEOL

EMBANNADURIOÙ BARR-HEOL EVIT AL LIDERIEZH

1 Leksional ar sulioù hag ar Gouelioù (dre offset)

Bloavezh A	16,00 L
2 Bloavezh B	18,00 L
3 Bloavezh C	16,00 L

An tri bloavezh war un dro

4 Levr-ofereñn : Azvent — Nedeleg — Epifaniezh	10,00 L
5 Levr-ofereñn : Korreiz — Pasion — Pask	11,00 L
6 Levr-ofereñn : Amzer-Fask	11,00 L

An tri levr-ofereñn war un dro

7 Levr-ofereñn : Gouelioù ar Sent

Lenndadennoù pemdeziek

Bloavezh 1. Peder levrenn, pep hini	7,00 L
Ar bloavezh klok	25,00 L
Bloavezh 2. Peder levrenn, pep hini	7,00 L
Ar bloavezh klok	25,00 L

Ritualioù roman

Ritual Sakramant ar Briedelezh (lieskrivet)	6,00 L
ritual nevez ar Vadeziant (gant tonioù)	
nevez-voulet dre offset	5,00 L

Goulenn an holl levrioù-se dre chekenn-bost pe chekenn-bank

Revue Barr-Heol : Buhulien 22300 Lannion,
K.R.P. 245-453 Roazhon

Merkit war ho chekenn ar pezh a vennit hag e vlot servijet kerkent hep mizioù all. Erbediñ a reot timbroù hag espem a reot ivez amzer a ra war-dro ar gelaouenn pe ar c'hasadennoù. Trugarez !

KOUMANANT DA VARR-HEOL :

Koumanant ordinal (Breizh ha Frañs)	25,00 L
Studieren :	20,00 L
Brioù estren :	28,00 L



Dre breñañ embannadurioù **Barr-Heol**
e sikourit ar gelaouenn da vevañ !

Prenit :

Levr-ofereñ Gouelioù ar Sent,

ur pezh pikol levr liesskrivet : 25,00

Ritual ar Vadeziant, dre offset : 5,00

Goulenn al levrioù dre chekenn :

Revue Barr-Heol, Buhulien 22300 Lannion

C.C.P. 245-453 Roazhon.

Imprimeur : abbé Yv. Le Gall, Copie 22 Pederneec.

Mouler : an Aotroù Gall, person Pederneec.

Directeur de la publication :

M. Le Clerc, Buhulien 22 Lannion, Gérant.

Rener ar gelaouenn :

An Aotroù Klerg, person Bulien, 22 Lannuon.

Périodique inscrit à la C.P.P.P.

sous le n° 29 746.

